

kelaouenn
sokialour
breizhek

**AL
LANV
45**

STOURM
AR
PANELLOÙ-HENT



12 PAJENN OUZHPENN

AL LANV 45 - MEURZH 1988 - 18 lur



Marc'harid Gourlaouen

Embannet hon eus war Al Lanv 43 kelec'h liuzher Yann Talbot a-zivout Marc'harid Gourlaouen. Mantrus e kavemp an doare ma oa bet dismegañset ur vaouez he doa dibabet ar stourm difeuls. Skrivet hon eus da Yann Talbot evit kaout keleier diwar-benn an afer-se, setu e respont:

CHOLORI
Kasetenn ar vagale
—maltrick—

12 nivern 1441
Bent-dall Kergahin
79112 Landolau

E miz Eost '87 em eus bet ur respont berr digant person Douarnenez (dek linenn) o lavarout din sellout ouzh luc'hskriz lizher ar vikel vras kaset da "Skol Ober". Lizher ar vikel vras a lavare e oa bet graet mat gant ar person evel m'en doa graet, ha ne oa bet graet gaou ebet e gwirionez da Varc'harid Gourlaouen o lidañ un oferenñ e galleg peogwir e oa bet kanet ur c'hantik bennak e brezhoneg. Ouzhpenn-se ret eo d'an Iliz implijout ar yezh a vez komprenet gant an holl, hag ar brezhoneg n'eo ket.

E diwezh miz Eost em eus bet ul lizher all digant an aotrou 'n eskob Kemper o lavarout hogos an hevelep tra. Sed aman e arguzennou:

- a) ar yezh a zo e servij al liderezh, ha n'eo ket ar c'hontrol;
- b) peogwir ne oar ket an holl brezhoneg e Douarnenez, ha peogwir e vez lidet an oferennoù dalc'hmatale galleg, n'eo ket ober gaou ouzh an DII M. Gourlaouen lidañ hec'h oferenñ-gañv e galleg. An nebeud kantikoù ha lennadenoù e brezhoneg a oa a-walc'h eviti;
- c) ar c'hlemmadegoù resevet 'enep person Douarnenez (rouez-tre eme an eskob) a ziskouez n'eo ket naturel ar c'hlemm. Artifiñsel ez eo ar c'hlemmadegoù-se hervez an aotrou 'n eskob.

War ar poentoù-se e respontin berr-ha-berr:

- 1. ar brezhoneg a c'hell kenkoulz hag ar galleg, pe n'eus forzh peseurt yezh all, servijout d'al liderezh ha da bedenn ar gristenien;
- 2. n'on ket prederiet gant ar yezh a vez implijet en iliz Douarnenez a-hed ar bloaz. Met evit ur wech, evit interamant unan eus gwellañ difennerien ar brezhoneg, ne oa ket diaes ober gant ar brezhoneg dre zoujañs evit Marc'harid Gourlaouen hag evit ar vrezhonegerien niverus a oa eno;
- 3. emzalc'h pennadurezhioù eskopti Kemper a ziskouez n'o deus ken ar vrezhonegerien o flas e buhez an Iliz ofisiel. Ar vrezhonegerien a zo lakaet er-maez eus an Iliz ofisiel. Gallout a reont chom e-barzh, met gant ma tavint betek o marv. An emsaverien o deus neuze ar choaz-mañ ma fell dezho bezañ interet e

brezhoneg:

—pe dont da vervel en eskopti Sant Erieg pe Wened;

—pe neuze goullenn un interamant sivil, er-maez eus an Iliz c'hall, ha pediñ ur person brezhoneger da lavarout ar pedennoù er vered;

4. N'eo ket bet rouez ar c'hlemmadegoù; resevet em eus-me eilskridoù eus kantadoù a sinadurioù (ouzhpenn 450), o tont eus Breizh evel just, eus rannvro Paris e-touez ar Vrezhoneg divroet, eus ar broioù keltiek, eus an emsavadurioù a zifenn ar broioù gwasket en Europa, eus Italia, Belgia, Alamagn, Kroatia, hag all. Sinadurioù a-berzh beleien eus meur a vro en Europa em eus bet. Hep kontañ ar pezh n'am eus ket resevet, hag a zo bet kaset war-eeun da Zouarnenez. C'hoazh e tegouezh ganin lizheroù-klemm all. Embannet eo bet va c'hlemm e meur a gelaouenn en Europa. Kannad ar pab e Paris a zo bet kaset dezhañ ivez ar skridoù;

5. War a seblant n'eo ket chaletre an Iliz ofisiel en eskopti Kemper gant kelennadurezh ar pab war wrioù mab-den, na war dalvoudegezh ar yezhoù hag ar sevenadurioù en arvar;

6. N'emañ ket e-sell person Douarnenez da zoujañ ouzh youl diwerzhañ ar re varv Ober a raio diouzh e c'hoant e-unan hep derc'hel kont eus ar pezh a vo bet goullennet gant al laiked. Ur sindo a zo bet e Roma nevez zo war plas al laiked en Iliz. Met e parrez Douarnenez se ne dalvez ket;

7. Graet e vo sur-mat ur gouel evit enorif labour ha buhez Marc'harid evit dezha-bloaz he marv. Ne vo ket ezhomm eus hor gwaskerien evit-se.

Yann Talbot
Presbital 22110 Rostrenn

Aotrou rener,
Gouzout a ran ne
vo ket embannet
va lizher daoust
da-se



DA YANN-BËR KEMENER
(S.o. AL 44 p.5)

Embannet e voe lizher Gwenael Emelyanoff (AL 42, p.2) dindan an titl "Lizher digor d'Al Lanv ha d'ar C'h.U.A.B." An titl-se, koulz hag urzh ar skrid, a ziskouez sklaer e oa anv el lizher bro Naoned a-raok pep tra. Abalamour da se hepken ez eo bet embannet.

Deñennus-kenan e oa, da'm meno, istor ar c'hartennoù. Gouzout a ran ervat ez echu Breizh, evit tud ar finister, e Montroulez pe en Oriant, pe zoken e Kemper pe e Kastell-Paol. Ma vije bet Padrig Herve ur finisterian e-giz ar re all, ne vijen ket bet souezhet o kavout en e levr kartennoù pevardepartamantel.

Hogen, m'hel lavarit, bevet en deus e bro Naoned ha stourmet en deus ouzhpenn evit unvanlezh politikel hor bro... Aze edo an dalc'h. Se eo a gaven dedennus. Setu perak ivez, da skouennaouiñ ar pennad kentañ gouestlet d'ar c'hartennoù (AL 41, p.24) e tibabis ur poltre eus Padrig Herve tennet e bro Naoned.

Un dra all. Skrivañ a rit: «Padrig Herve (...) en deus labouret e-pad bloavezhioù e Naoned evit adstagañ al Liger-Atlantel ouzh Breizh.» N'ouzon ket hag-eñ eo gwir (ret e vefe goullenn gantañ), hogen, mard eo gwir, gwell e vije bet dezhañ chom da lemel kontill bihan, rak morse n'eo bet distaget bro Naoned diouzh Breizh.

Rannet eo bet Bro-C'hall e rannvroioù; ul lodenn eus hor bro a zo en em gavet en ur rannvro anvet «Bretagne» hag ul lodenn all en ur rannvro anvet «Pays-de-Loire». Pezh a c'houlennomp eo e vefe lakaet Breizh en ur rannvro hepken.

Breizh hag ar rannvro «Bretagne» n'int na kar na par e Breizh ha betek-gouzout ez eo ar Vretoned, ha n'eo ket an deknokrated parizian, a lavar e pelec'h emañ o bro. War ar poent-se, da nebeutañ, ez omp emren.

Evel-just, pa'z eus anv a gaout yalc'hadou e rank kalz Breizhiz c'hoari gant ar rannvro «Bretagne». En hevelep mod, pa fell dezhi tapout ur yalc'had gant ar rannvro «Pays-de-Loire», ez eo furoc'h d'ur gevredigezh a vro Naoned dibab un

anv hep liv breizhat... Ar stourmoù a vez renet e Breizh avat, n'eo ket kaout yalc'hadou o fal nemetañ... Evit kenlabourerien Al Lanv da nebeutañ.

Kasomp hor saout da beuriñ en ur park all. Ur "fazi" am eus kavet en ul levr arall eus rummad Skol Vreizh (pe gentoc'h: spi am eus ez eo ur fazi!). E raskrid Chansons Populaires de Basse-Bretagne sur Feuilles Volantes e skriv ho kenlabourer Daniel Giraudon: «La production littéraire de langue bretonne n'est pas de celles qui forcent l'admiration des peuples. Comparée à d'autres elle n'est guère abondante. Elle est, de surcroît, mal connue, peut-être parce qu'elle n'a pas l'abondance de celles qu'ont fournies des idiomes plus prestigieux et plus chanceux que le langage breton. Les "grandes" œuvres littéraires occupent peu de place sur les rayons d'une bibliothèque et leur intérêt, à peu d'exception près est purement linguistique.»

Ankouac'haet en deus Giraudon lavarout ez adskrive ali lenneien zo an XIX^{vet} kantved, levezonet gant ar spered gall (ret eo skodegiñ ar pobloù all, ret eo leuniañ al levrageoù!). War a halfal ne oa ket Daniel Giraudon emañomp e dibenn an XX^{vet} kantved, ha ne oar ket ivez petra eo al lennegezh. Furoc'h e vije bet dezhañ enta komz muioc'h eus ar pezh a gar, al lennegezh hengounel, ha nebeutoc'h eus ar pezh n'eo ket evit kompren: al lennegezh a-vremañ.

Ur vombezennig ho peus lakaet war Al Lanv 44 ha tec'het oc'h kuit, digoumanantet da viken. Echiñ a ra an tabut amañ enta. D'hol lenneien da varn.

PASKAL AR MARC'HEG

FESTOÙ-NOZ ROZ



SKOIT
36.15

KATELL GOLLET

PENNAD-STUR

Dismegañs atav! N'eus tra cheñchet e politikerezh ar Stad c'hall en hor c'heñver abaoe hon niverenn diwezhañ. Nac'het e vez atav an D.E.U.G. brezhonek. Gwashaat a ra an traoù evit *Diwan*, nac'het ma vez bepred an ASS.E.D.I.C. d'ar skolaerien lakaet dilabour abaoe ar c'hentañ a viz Kerzu tremenet. Un nac'hadenn bolitikel, evel just, da bal dezhi peurvougan skolioù *Diwan*.

Gant taolioù-tarzh an A.R.B. a-enep an U.R.S.S.A.F. ha rektordi Roazon eo dasorc'het ar feulster politikel adarre. A-du pe a-enep an doareoù-ober-se hag an dezrann bolitikel stag outo ne c'heller ket tevel war savbontoù tud 'zo, kavet gwelloc'h ganto lakaat da enebourien hon emsaverien feuls kentoc'h eget ar re hon gwask. Plijet pe get n'eo skolioù *Diwan* divyezhek gall! Lec'hiet int en istor ar stourm evit ar brezhonek. Muioç'h a c'houid a zo evit *Diwan* o kensevel gant an Emsav sevenadurel hag o krediñ e kenskoazell Vreizhiz eget o faziñ war hon enebourien!

Dizunvaniezh a zo ivez e-mesk ar re a fell dezho ren ur stourm politikel evit Breizh. Lod anezho a zo aet a-du gant Pierre Juquin! Gwir eo ez eus lod ne vint morse touzet a-walc'h gant ar strolladoù politikel gall. Deomp da

c'houzout n'eus nemet *Emgann* en dije galvet an dud da chom er gêr. Evidomp-ni, n'eus tamm fiziñs da gaut en hini eus an danvez-presidanted ha n'eus hini ebet a zellezfe kaout mouezh ur Breizhad.

Gouel Broadel ar Brezhoneg a vo dalc'het e Karaez d'an 19 ha d'an 20 a viz Meurzh. Ur skouer vat ha ret-holl eus nerzh-stourm hor c'henvroiz hag eus o fiziñs e dazont hor yezh hag hor pobl. Unvaniezh evit ur gouel holivrezhonek, lec'h kejañ evit ur bern tud ha ne oant ket en em welet, n'o devoa ket kenlabouret kalz, abaoe ma ne oa mui eus *Gouel ar Brezhoneg*. Ar brezhoneg da yezh ofisiel amzer ur penn-sizhun da c'hortoz gwelloc'h. Chañs vat da Ouel Karaez d'ober berzh!

Diwan, daoust d'un nebeut mouezhioù distoniñs bet meneget uheloc'h, ne seblant ket bezañ paket gant ar berralan. Gouel ar sport a vo gant yaouankizoù Europa evit *Eurosokol* d'an 8, 9, 10 a viz Ebrel. Daoust d'an enkadenn eta eo gouest *Diwan* da vrudañ talvoudegezh e gelennoù-riehz en ur lidañ e zekvet

bloavezhiañ. E Brest atav e vo digoret ar skolaj brezhonek kentañ en distro-skol a zeu, ur c'hammed a bouez bras a ziskouezo siristad ar Vretoned hag o mennegezh da gas da benn an erv bet boulc'het unnek vloaz 'zo.

Ger d'hon lennerien

Al Lanv 48 pajennad! Setu gant miz Meurzh eil niverenn ar bloaz, danvez fonnus ha liesseurt enni. N'eo ket bet lakaat da niverenn doubl koulskoude dre ma kave deomp hon devoa un tamm dle e-keñver hon lennerien.

Spi hon eus e voc'h plijet gant an niverenn-mañ hag e vimp skoazellet da vont pelloc'h war an hent-se. C'hoant hon eus da ginnig deoc'h muioç'h a zanvez evel ar wech-mañ bep taol. Setu perak e kavoc'h pennadoù nevez, a skridvarmouñezh da skouer, dindan anvioù tud nevez pe zamnevez a genlaboure reoliek.

Hepdoc'h avat, ne vimp gouest d'ober netra. Kinnig muioç'h a zanvez evit ar memes priz a zo dibosupl ma ne zeu ket muioç'h a goumananterien. Adkoumanantiñ e koulz, kavout deomp koumananterien all, brudañ ar gelaouenn, prenañ niverennoù "kozh", setu doareoù efedus da skoazellañ *Al Lanv*. Trugarez en a-raok!

AL LANV ■

An holl skridoù, luc'hskeudennoù, tresadennoù zo © Al Lanv hag an aozerien 1988

CPPAP 62602 — ISSN 0246-5396 — kelaouenn diskilet hervez al lezenn Meurzh 1988
rener: Padrig an Habask
li-moulañ: du Marin, ar Gelveneg
Al Lanv, 59 hent Kerdionioù Vihan
BZH29000 Kemper
koumanterioù: 100 ha 150 lur.

TAOLENN

NIVERENN 45 (C'hwevrer-Meurzh 1988)

1	Golo	<i>Tudu</i>
2	Marc'harid Gourlaouen	<i>Yann Talbot</i>
3	Lizhiri	<i>Al Lennerien</i>
4	Pennad-stur	<i>Al Lanv</i>
5	Taolenn	
BREIZH HAG AR BED		
5	Dilennadeg ne vimp ket trubardet ken	<i>Help ar Balp</i>
6	Iwerzhon Seán Mac Bride	<i>Éamon O Ciosáin</i>
9	Iwerzhon Ar stourm evit ar yezh	<i>Éamon O Ciosáin</i>
16	Kembre	
	1968-1988: Sokialour ha Kembre	<i>Ned Thomas</i>
21	Bro Naoned	
	Seitek ha pevar-ugent pik pempe: mouezh Breizh e bro Naoned	
	Pennad-kaoz gant <i>Tangi Manac'h</i>	
KEVREDIGEZH		
28	Ar c'hoef hag an tchador	<i>Pêrig Kof-Ruz</i>
29	Tiez hor bro	<i>An Doujet</i>
31	An dispac'h e-touez al loened gouez	<i>Tudual Huon</i>
	Natur	<i>Tudu</i>
33	Sonerezh: Penn-kil-ha-blues, ar sonerezh black? A-du!	<i>Goneri Ap Riori</i>
33	Lazherezh	<i>Paotr Chil</i>
34	¡N'eus forzh petra!	<i>Fañch Jeraniom</i>
	BT Psi Kozh-Noe	<i>Tudu</i>
LENNEGEZH		
35	Ali d'al lennerien	
36	Barzhonegoù:	
	Skuizhder	<i>Jakez Riou</i>
	Jose	<i>X</i>
	Mona ha Lena	<i>Goneri Ap Riori</i>
	Deus	<i>Waliza Futuna</i>
	Ebrel '74	<i>Lluís Llach</i>
39	Danevelloù	
	Den ne dal dour ma dalaou	<i>Alan Botrel</i>
	Kem evit Kern	<i>Boccaccio</i>
42	BT: Albert, ar Barzh Labourer	<i>Tudu</i>
44	Skridvarnerezh	<i>Alan Botrel</i>
46	Berr-ha-Berr (kemennadennoù)	

Evit sevel niverenn 45 *Al Lanv* o deus kenlabouret :
Skridoù: Goneri Ap Riori, Help ar Balp, Giovanni Boccaccio (tr. Alan Brenn), Alan Botrel, An Doujet, Waliza Futuna, Tudual Huon, Fañch Jeraniom, Pêrig Kof-Ruz, Lluís Llach (tr. Fulup ar Brondh), Al Lanv, Tangi Manac'h, Paskal ar Marc'heg, Éamon O Ciosáin, Paotr Chil, Jakez Riou, Yann Talbot, Ned Thomas (tr. Al Lanv), Tud. X. (tr. Fulup ar Brondh).

Tresadennoù: Creston (p.33, 47) J. Malivel (p.36,37,38) tennet eus *Ar Seiz Breur* J.R. Roté, emb. Breizh hor Bro 1987; ar skeudennoù o vont gant ar pennad "Ar stourm evit ar yezh" a zo tennet eus *Anais is Aris, Cúrsa i labhairt na Gaelige* RTE 1981; Tud. X.

Luc'hskeudennoù: E. Carsin (p.21), J. Boulas (p.28), X.

Lizherennadoù: Dwi Kervella.

Stummañ: Paskal ar Marc'heg.

Skretourva: Padrig an Habask

KAN EVIT AN ELEKSIONOÙ

«NE VIMP KET TRUBARDET KEN!»

War don: We won't get fooled again
gant "The Who"

Stourm a ri ba'r ru
Hag ho pugale ganeoc'h-hu
Hag ar moral ho peus doujet 'vo echu

Ar baotred vras a ziskoueze 'n hent
O deus lâret e begement
D'ar sistem kozh 'vo ret diskar prim
[ha naet]

Diskan

Kit da vrell' ar c'hloc'h 'vit al
[lezennoù nevez]

Stlapit daourm en enor ar re-se
C'hoarzhit glas pa weil labour
[an deiz-se]

C'h an da son war ar gitar
Evel dec'h ha 'vel ware'hoar'
Lâr' a rin ur bedenn evidac'h
Ne vimp ket trubardet ken!

"Dont a rae ar cheñchamant"
'Lâre ar re-se deomp dalc'hnat
"Hag ho liberte 'peus bet gant ar
[goumanant]"

Mes ar bed 'neus' memes fat
O Istor brein zo aze c'hozh
Memes bannieloù oa gante er brezel
[bras.

Diskan

Na c'houlennit mann evidout — int i a
[ray]

N'am chaliñ ket gant ar sindikad-se
Deuit da lârouñ amañ er c'hamera
'Peus fiziñs enno hag o c'hozh-tarm-
[tra]


N'eus netra amañ 'barzh ar gêr
'Vije bet cheñchet abaoe dec'h
Hag ar sloganioù zo bet lemet e pep
[lec'h]

Hag ar strollad ruz zo kaoz
'Deus cheñchet program 'pad an noz
Ha deuet da vout evel ar vistris gozh

Diskan

Ya! Ar pennoù nevez! Memes re ha
[warlene!]

HELP AR BALP ■



SEÁN MAC BRIDE

(1904 - 1988)

MARV EO SEÁN MAC BRIDE

D'ar 15 a viz Genver ez eo marv Seán MacBride e Dulenn. Kazetennoù Bro-C'hall n'o deus ket lavaret kalz a dra diwar e benn, met lec'h o doa d'ober koulskoude.

Kemeret en deus MacBride perzh e buhez Iwerzhon e-pad zri c'hantved-mañ. Kaset en deus stourmoù en e vro koulz hag e-touez broioù ar bed a-bezh. Iskis a-walc'h eo gwelout un den a oa bet pennrener an I.R.A. er bloavezhioù '30 (betek 1937) o resev priz Nobel ha priz Lenin (evit ar peoc'h an div wezh) evit e labour!

Bet eo Seán MacBride er skol e Pariz pa oa yaouank. Ganet eo bet eno peogwir e oa deuet e vamm, Maud Gonne MacBride (passionaria veur Iwerzhon 80 vloaz zo) da chom e Pariz goude bezañ dimezet d'ar major MacBride. Lazhet eo bet an tad gant ar Saozon goude taol-dispac'h 1916. Savet eo bet MacBride yaouank e Pariz, ha gwelout a-rae endro dezhañ ar stourmoù a-enep an impalaerouriezh a veze kaset gant e vamm. Distro eo da Iwerzhon, ha kemeret perzh gantañ en I.R.A. adalek 1919 (pa ne oa nemet 15 vloaz!) e-touez paotred c'hav ar B Company eus an Trede Bataillon e Dulenn.

Michael Collins a verzas e oa sperelek ar paotr yaouank e bouez-mouezh drol (komz a rae gant ur "blaz" gall — 'r' ar galleg zo chomet gantañ e-pad e vuhez, ha ne oa ket gouest da lavarout an 'r' saoz!). Roet en deus Collins labourioù ispisial dezhañ da ober. Pa'z eo aet Collins hag Iwerzhoniz all da Londrez da varc'hata gant ar Saozon evit kaout ar peoc'h ha frankiz Iwerzhon, ez eo aet MacBride gantañ evel skoazeller. Kaset e veze da b'Pariz d'ober bruderezh, ha peogwir e oa yaouank hag un doare inosant dezhañ e oa gouest da vont eus Londrez betek Dulenn ha dont en-dro hep na vefe taolet evezh outañ. E-vele-se e kase gourc'hemenoù Collins da zDulenn, ha respontoù Parlamant Iwerzhon en-dro da Londrez.

Kontet en deus din istorioù ar mare-se eus e vuhez, ha penaos e oa darbet d'ar pennadoù-kaoz bras saoz mont d'ar foz pa'z eus bet trapet ur c'habiten iwerzhonat o prenañ armoù digant an Alamanted e Hamburg (kaset e oa bet di gant Collins just a-walc'h).

Neb en defe c'hoant gouzout hiroc'h war se a c'hallo lenn etfivorennoù MacBride e-barzh al levr "Survivors", gant Uinseann Mac Eoin (eil embannadur e 1987, IwE9 eo priz al levr).

Pennrener an I.R.A. ha breutaer.

N'o deus ket lavaret kazetennoù Iwerzhon kalz a dra diwar-benn labour MacBride en emsav republikan, dreist-holl etre 1923 ha 1937, hag adarre e-pad ar brezel 1939-1945. Kement-se n'eo ket souezhus eus perzh ar gazetennierien hag an istorourien a zo o klask ober *révisionnisme* enepbroadelour Istor Iwerzhon abaoe 15 vloaz.

Setu penaos e oa e vuhez: toullbac'h, ha darbet dezhañ bezañ fuzuilhet e-pad «Brezel ar Vreudeur», Brezel Diabarzh Iwerzhon (1922-1923). E-pad 14 vloaz bennak en deus redet — labourer en deus e kazetennoù e Pariz, e Londrez hag e Dulenn, gant anvioù-pluenn peurliesañ (en *Agence Havas* e Pariz, er *Morning Post* — ur gazetenn impalaerour saoz, hag en *Irish Press*).

Ur mare fall evit an I.R.A. eo bet ar bloavezhioù '30. Aet e oa kuit kalz a dud pa'z eas Fianna Fáil ha De Valera e-barzh e 1932, hag aet e oa kuit paotred an tu kleiz (ar "Republican Congress") e 1935. Poan en doa MacBride da zerc'hel an arme vihan war an hent, hag hervez ar pezh am eus klevet digant stourmerien gozh, ne gompren ket mat bepred sperelek ar vilitanted ordinal.

Aet eo da alvokad (breutaer) e 1937, ha dihanet en deus da labourer en I.R.A. Perak? Peogwir e kave dezhañ e oa bet disklêriet frankiz Iwerzhon gant Lezenn-Diazez (*Bunreacht* pe "bonreizh") De Valera e 1937. Rannet e oa ar vro koulskoude, ha chom a rae stag-mat eus Bro-Saoz, e-keñver an arc'hant hag ar c'henwerzh.

Lakaet eo bet holl baotred an I.R.A. en toull-bac'h hep bezañ barmet e-pad brezel 39-45. Daou anezho zo marvet goude bezañ graet yun ha goude ma vije bet skolet ganto en un doare spontus gant gwarded an toull-bac'h. Pa voe digoret an enklask ofisiel war se e voe lakaet MacBride da alvokad ar Republikaned. Graet en deus berzh,

amnesty international



ha lakaet gouarnar an toull-bac'h da anv ne vije ket bet graet traoù ken spontus d'ar chas zoken!!

Kement-se ivez zo bet tavet gant kazetennoù Iwerzhon.

Strollad politikel MacBride: Clann na Poblachta.

Erru skuizh gant De Valera e oa kalz a Republikaned goude ar brezel ha goude ar prosez 'lec'h m'en doa graet MacBride kement a drouz a-enep ar gouarnamant sañset "republikan". Lañsañ a reas MacBride ur strollad republikan nevez, Clann na Poblachta (Bugale ar Republik) e 1946.

Mont a reas Clann na Poblachta e-barzh e 1948, asambles gant Fine Gael. Souezhus a-walc'h e oa kement-se, ur strollad republikan hag ar strollad ar mutañ mignon gant ar Saozon er memes gouarnamant. Disklêriet eo bet ar Republik e Stad Iwerzhon ar C'hreisteiz e 1949, ha lañset ur stourm etrevroadel a-enep an disparti en Iwerzhon (*Anti-partition campaign*, hag a veze graet dre gannatioù Iwerzhon ar C'hreisteiz dre ar bed).

Labourer en deus MacBride er stourm-se evel just, hag evit ar wezh kentañ eo deuet da labourer an institusioù evel Kuzul an Europ hag an A.B.U. (Aozadur ar Broadoù Unanet — ONU). Ministr an Aferioù Estren e voe e-pad tri bloaz (1948-1951). Displeget en deus

penaos e oa a bouez evit Iwerzhon chom er-maez eus ar brezelioù ha chom neptu e-keñver ar bloc'hoù bras (an Amerik hag ar Rusianed). Distreiñ a rae da skeiñ war an tach-se e-pad e vuhez, da c'houdevezh.

Echu e oa gouarnamant Fine Gael/Clann na Poblachta e 1951 goude skandal danvez-lezenn "Ar Vamm hag ar Vugale", p'o doa

pouezet eskibien gatolik Iwerzhon war ar gouarnamant evit herzel outañ da lakaat servijoù genel bugale an ospitalioù da vezañ digor d'an holl, hag evit mann ebet evit ar re baour! Rebechet zo bet da vMacBride bezañ chomet hep derc'hel penn ouzh an eskibien d'ar mare-se. Memes tra e oa deuet ar gouarnamant-se a-benn eus kudennoù all e-giz hini an droug-

skevent, hag a zo bet dic'hastet gant Ministr ar Yec'hed (Clann na Poblachta).

Echu eo gant ar strollad-se e 1957, goude bezañ lakaet er-maez eus ar gouarnamant evit an eil gwezh peogwir en doa lakaet patred an I.R.A. en toull-bac'h (1956-1957). Marteze n'eo ket bet fin a-walc'h MacBride da lakaat ar strollad da badout. Ouzhpenn-se e oa diaes da forzh piv sevel ur strollad nevez pa vote lodenn vrasañ holl ar boblañs evit ar strolladoù bras dre gustum.

MacBride ha gwirioù Mab-Den.

Kemeret en doa perzh e Kuzul Europa etre 1948 ha 1951, ha bet eo e-touez ar re o deus savet Emglev Europa war Gwirioù Mab-den e

1950. Goude bezañ echu er gouarnamant ha skuiñ gant traoù politik Iwerzhon en deus beajet muioc'h. Pa oa e Suafrika e 1959 en doa goulennet ma vefe laosket prizonidi politikel zo da vont. Deuet e oa ar soñj dezhañ e c'heller pouezañ war gouarnamantoù taer ha tirant dre ober bruderezh er bed a-bezh. Gant ar mennozh-se eo en deus savet MacBride *Amnesty International* e 1961 (a-gevret gant tud all evel just).

Abaoe ar mare-se betek fin e vuhez en deus labourer hep ehan evit gwirioù Mab-Den, forzh pelec'h e ve. Digor e oa dor e di hag e zivskouarn d'an holl re wasket, ha kaout a rae amzer bepred evito (kontant e veze atav da gomz da gazetennierien ha tud a oa oc'h ober enklaskoù war Istor ar stourm en Iwerzhon ivez, hag er mod-se eo ez en bet o kaozeal gantañ e 1982).

Meur a garg en deus bet er c'huzulioù etrevroadel evit gwirioù an dud hag ar pobloù bihan, ha brudet e oa ivez peogwir e c'houlenne dalc'hmat e vefe dilezet an armoù nukleel gant ar broioù bras.

Burutlet en deus gouarnamantoù e kement lec'h ma veze graet gaou d'an dud: Namibia (1973-1976), Afrika ar Su, torfedoù arme Israel e Liban e 1982 ha dibaoe, hag ar gouarnamant saoz evel just: e-pad ar yun hir e 1981, a-enep d'ar furcherezh war gorfoù ar brizonidi noazh (dreist-holl ar merc'hod), ar strip searching e toullou-bac'h Iwerzhon an Hantemoz.

A-drugarez dezhañ ivez ez eo bet lakaet kement kevredigezh amerikan en doa c'hoant da zigeriñ ul labouradeg en Iwerzhon an Hantemoz da sinañ "Priñsipoù MacBride", ha da brometiñ e vefe ingalet al labour en un doare just etre an div boblañs. N'eus ket bet kalz a vrud diwar-benn ar priñsipoù-se er c'hazetennoù goude marv MacBride kennebeut — rak graet o deus muioc'h a vad en Iwerzhon an Hantemoz eget ar burevrit en Ingalded el Labouradegoù bet savet gant ar gouarnamant saoz ha ne vez heuliet e lezennoù nemet gant 10% eus al labouradegoù!

Un dra a c'hellfed rebech dezhañ e-keñver Iwerzhon an Hantemoz eo ne grede ket e oa kontrol an unionisted penn-da-benn da vezañ dindan Dulenn. Evel kalz a republikaned kozh, e krede MacBride e welte an

unionisted eno ar "sklêrijenn" un deiz bennak. An emsav republikan a-vremañ a wel an traoù-se en ur feson all.

Ur vuhez hir ha frouzehus en deus bet Seán MacBride bepred. Kaoz zo bet da lakaat anezhañ da Brezidant Iwerzhon ur wezh zo bet. Dignoc'h e vefe bet eget forzh piv da vezañ lakaat er garg a brezidant, rak labourer en deus evit e vro hag evit gwellaat stad mab-den dre ar bed, e-pad e vuhez. Suaimheas agus solas siorrañ gó raibh aige.

ÉAMON O CÍOSAIN

Evel-just, ar c'hazetennoù saoz o deus lupet war Mac Bride, o enebour kozh, par ha ma c'hellent. An *Times* zo aet pell-tre gant e vurutellerezh, hag an titl a oa "Death of an Evil Man". Memes ton gant ar c'hazetennoù all: un den drouk, un "terrorist" gwisket evel ur fafist, "Godfather" an I.R.A. ha n'ouzer ket petra e'hoazh zo bet graet outañ.

Death of an evil man
by Bruce Anderson
He assassinated both the Sinn Féin and the Provisional IRA, the Catholic Church, and in 1981 he was elected Taoiseach. He was the only man to be elected Taoiseach who had not served in the army. He was a member of the House of Commons, the House of Lords, and the House of Bishops.

"MacBride Junior was a murderer. As Chief of Staff of the IRA in the late '20s and '30s, he planned several killings, and may have had a hand in the assassination of Kevin O'Higgins, the finest politician Independent Ireland has produced. He also displayed his contempt for Ulster Protestants. He had a psychopath's inability to understand those with whom he disagreed."

o tont ingal bep miz

bremañ

kazetenn
ar stourmoù
e Breizh

koumanant-bloaz : 120 lur


8 ru Hoche
35000 Roazon



IWERZHON : AR STOURM EVIT AR YEZH

Labourer en deus kalz an emsav evit an iwerzhoneg evit dihun ar spered broadel en Iwerzhon e penn-kentañ ar c'hantved-mañ. Deuet e oa ar yezh da vezañ arouez anatañ ar vroadelouriezh iwerzhonat zoken. Goude Kevrenn Gwareziñ an Iwerzhoneg (*Society for the Preservation of the Irish Language*, 1876-1892) e oa bet savet *Conradh na Gaeilge* (Kevre an Iwerzhoneg) e 1893 gant Eoghan Mac Néill eus Antrim, Douglas Hyde (mab ur ministr protestant eus Ros Comáin) hag an tad E. O Gramhnaigh (an hini

en deus skrivet al levrioù bihan evit deskiñ ar yezh). Evit an dud-se e oa ur soton goulenn an emrenerezh evit Iwerzhon ha dilezel yezh ar vro er memes koulz. Goude ur bern stourmadoù evit difenn ar yezh hag evit gounit tachenn evit er vuhez foran (panelloù, skolioù, skolioù-meur, traoù ofisiel) en deus votet Conradh na Gaeilge a-du gant frankiz



politikel ar vreo e 1915. Evit lodenn vrasañ an izili ne oa ket tu da gendrec'hel gant ar stourm evit ar yezh 'keit ha ma chome Iwerzhon dindan ar Stad estren, saoz.

Kalz eus izili Conradh na Gaeilge o deus kemeret perzh en emsavadeg 1916 (muic'h eget an hanter eus skourroù zo) hag er stourm er bloavezhioù da heul. N'eo ket souezhus eta e vefe bet lavaret er bloavezhioù-se e teufe an iwerzhoneg da vezañ yezh ofisiel ar Stad a oa o vont da vezañ savet. Evit lod, e vefe ur yezh ofisiel, hag evit lod all, yezh nemeti Iwerzhon a-benn 25 bloaz! Emvod kentañ an *Dáil* (Parlamant Iwerzhon) a zo bet graet hogozik penn-da-benn en iwerzhoneg e 1919.

Pa oa echu ar Brezel Diabarzh eo en deus kroget ar gouarnamant kentañ d'ober e zevel evit ar yezh.

Petra a oa d'ober?

I. AN IWERZHONEG E 1922.

Abaoc kantvedoù e oa bet disprizet an iwerzhoneg gant ar Saozon. Tu 'vefe da venegit pennadoù a-leizh e-giz hini Spenser (barzh Elizabeth I) hag a zisplege perak e oa ret distrujañ ar yezh iwerzhonat evit dont a-benn eus spered Iwerzhoniz. Graet e veze an aferioù a lezenn dre ar saozneg abaoe amzer an Normaned; deut e oa ar saozneg da vezañ yezh ar c'hêrioù bras abred a-walc'h (dreist-holl holl gêrioù ar c'hreisteiz hag ar reter); ar "Plantasionoù" e-pad ar XVII^{vet} kantved o doa degaset saoznegerien war douaroù gwellañ ar vro (daoust ma komze lod eus trevadennerien an hanternoz gouezeleg Bro-Skos er penn-kentañ peogwir e oant ginidik eus hanternoz Bro-Skos).

E-pad ar XVII^{vet} hag an XVIII^{vet} kantved e c'houneze ar

'saozneg tachenn eta: diskaret e voe skolioù Iwerzhoniz hag ar manatioù (kreizennoù ar studioù broadel). Saoznegerien a oa perc'henn war an douar hag int eo a oa mestr er vuhez politikel ken e oa ret d'an iwerzhoniz ober gant ar saozneg evit en em zisfuihañ er vuhez foran.

N'eo ket an estrenien hag o gouarnamant hepken a oa o tagañ ar yezh. Ar gwashañ taol bet roet dezhi a oa c'hoarvezet e penn kentañ an XIX^{vet} kantved p'he deus kroget an liiz katolik (liiz lodenn vrasañ an dud) d'ober gant ar saozneg. Ar vourc'hizien gatolik a reas memes mod.

Adalek 1831 e oa eus ar skolioù kentañ-derez saoz e pep lec'h en Iwerzhon. Difennet e oa komz ar yezh pe ober ganti er skolioù-se evel just betek fin ar c'hantved. Ne c'helle ket kalz a dud mont d'ar skoloù eil-derez, met degemeret eo bet an anv "Celtic" enne e 1878 memes tra.

Met an nerzhioù brasañ a oa kontrol d'an iwerzhoneg a oa an naon hag ar baourentez. Kroget o doa Iwerzhoniz da zivroañ e diwezh an XVIII^{vet} kantved, hag ar chefc'hamant yezh a zo kroget er memes mare. Deut eo ar yezh da vezañ hini ar baourentez hag ar mizer, ha pa'z eo ret divroañ d'an oad a 18 vloaz, gwelloc'h eo deskin yezh ar broioù pinvidik — Bro-Saoz ha Stadoù-Unanet d'an ampoent. Sañset e oa iwerzhonegerien lodenn vrasañ an dud zo marvet gant an naon e-pad ar Gernez Vras (1845-1850).

Setu perak ne gomze ken nemet 15% eus an Iwerzhoniz o yezh hervez niveradegoù penn-kentañ ar c'hantved-mañ. E 1922 e oa dindan 10% moarvat (ha lod anezho er 6 kontelezh bet miret gant ar Saozon). E-kichen an dud-se (an iwerzhonegerien a-vihanik) e oa miliadoù a dud o doa desket ar yezh e kentelioù-noz Conradh na Gaeilge (bloavezhioù zo e veze gwerzhet 12.000 skwerenn eus levrioù-skol ar C'honradh).

Politikerezh ar Stad Dieub:

1. Ar skolioù

Perak komz eus ar skolioù da gentañ? N'eo ket diaes ar respont. Mennozh ar gouarnamant a oa adsevel ar yezh dre ar skolioù peogwir e oa bet distrujet gante e-pad ar c'hantved a-raok. Anad! Daoust da

se e lavare tud speredek evel an emsaver republikan Frank Ryan e oa an armerzh hag ar c'hudennoù sokial a oa kiriek da stad fall ar yezh. Mennozh ar gouarnamant a oa bet displeget gant an tad Corcoran, kelenner meur war skiant an deskadurezh e Dulenn, ha degemeret gant Eoin Mac Néill (bet laketaet da Vinistr an Deskadurezh er gouarnamant kentañ).

Er bloavezhioù 1924-1926 e oa bet aozet stajoù evit an holl gellennerien kentañ-derez evit ma vefent gouest d'ober skol dre an iwerzhoneg, pe da zeskiñ anezhi d'ar vugale d'an nebeutañ. An hanter eus ar skolaerien o doa tapet ar sertifikad "divyezhek". Kudennoù zo bet evel just peogwir e chome kalz a skolaerien abaoe amzer ar Saozon ha ne oant ket gouest, nag a-du, d'ober skol iwerzhonek.

Laketaet e oa bet an iwerzhoneg war roll danvezioù dre ret ar skolioù hag e-pad ur pennad er bloavezhioù '30 e oa bet lemet amzer digant ar c'hentelioù saozneg evit ober muic'h a iwerzhoneg.

Ouzhpenn-se zo bet krouet rummadoù skolioù disheñvel: ar skolioù A hag a rae pep tra dre an iwerzhoneg, ar skolioù B 'lec'h ma veze desket an hanter eus an danvezioù-studi drezi, hag ar skolioù C. Digoret eo bet ar skolioù eil-derez a-razoz evit stummañ danvez-skolaerien holl iwerzhoneger e 1927, ha miret e veze betek 80% eus ar plasoù enne evit bugale ar Gaeltacht.

Diaesterioù zo bet koulskoude: e-pad ar bloavezhioù kentañ-se e oa tabut bras etre difennerien ar rannyezhoù, ken ma veze rummadoù levrioù-skol disheñvel evit pep rannyezh (gwalarm, kornôg ha mervent). Moarvat e oa diaesoc'h an iwerzhoneg evit bugale peurrest ar vro en abeg da se ha d'ar skritur na oa ket unvanet (embannadurioù ar Stad a gemme o skritur alies zoken) (lizherennoù gouezeleg pe roman e oa).

Laouen e oa ar skolaerien d'ober o dever e-keñver yezh en amzer-se. Diwezhatoc'h e trenkas an traoù etre sindikad ar skolaerien hag ar gouarnamant. Teurel a rae ar gouarnamant (dreist-holl hini De Valera) ar bec'h war ar skolaerien pa veze lavaret dezhañ ne'z ae ket an traoù war-raok buan a-walc'h. Lavarout a rae ar skolaerien ne oa ket


ar gouarnamant oc'h ober e zevel ivez peogwir ne gomzed morse iwerzhoneg e-pad emvodoù Kuzul ar Vinistred.

Kaset e veze ar vugale d'ar Gaeltacht e-pad an hañv da vont d'ar skoloù-hañv (stajoù iwerzhoneg, ha skoazellet e veze ar stajoù-se gant ar gouarnamant).

E-pad ar bloavezhioù '40 ha '50 eo moarvat e oa krog ar bobl da vont skuizh gant ar goz diwar-benn ar yezh. Pa ne oa ket bet adsavet ar yezh e pep lec'h goude 30 vloaz, a lavare lod, biken ne vefe graet.

Heuged e oa kalz a dud gant an iwerzhoneg dre ret (ret e oa pakañ an amodenn iwerzhoneg evit kaout ar vachellouriezh, pe ur post dindan ar Stad — nemet er Parlament! — pe evit mont d'ar Skol-Veur).

Serret eo bet ar skoloù ispisial evit an danvez-skolaerien iwerzhoneger (echu e 1962, dindan Hillery, deut da vezañ Prezidant Iwerzhon ar C'hreisteiz bremañ). Pa oa kaoz eus mont e-barzh ar Marc'had Boutin e-pad ar bloavezhioù '60 e veze lavaret ne servije an iwerzhoneg da netra evit



1972) a ra abadennoù liesseurt (sonerezh, sportoù, kelc'her, kenstrivadegoù, abadennoù relijiel...) en iwerzhoneg penn-da-benn, e-pad eizh eurvezh bemdez (8.00 a.k.-1.00 g.k. — 5.00 g.k.-8.00 g.k.). Pevar studio a zo gant ar radio, unan er gwalam, unan er c'hornôg, unan er merwent hag unan e Dulenn. Tu zo dezhañ implij studioioù radio ar vro a-bezh. Er radio-se e vez klevet iwerzhonegerien o komz eus a-bep seurt traoù (armerzh, skiantoù, buhez politikel — kalkiz a bolitikerien a oar iwerzhoneg mat —, kudennoù pellvro pe Europa, hag all). Laketaet en deus gerioù nevez da vezañ degemeret gant an iwerzhonegerien, ha tud ur rannyezh hag a selau ar radio alies n'o deus tamm poan ebet da gompren ar re all. Labour vras en deus graet war an dachenn-se. Tu zo bet d'hen ober peogwir ez eo ur radio digreizennet, da lavarout eo pep rannyezh he deus hec'h abaden an eil goude eben (evel pa vefe ur radio e Breizh gant studioioù e



Marx duit!
Marx is Lenin duit!

war-dro 10% eus an abadennoù "savet er vro". Prenañ a ra RTE ur bern abadennoù digant Bro-Saoz hag an Amerik. Abaoe 1986 e vez bountet war RTE evit ma savfe muioc'h a abadennoù e-unan, ha mont a ra stad an abadennoù iwerzhonek war wellaat eta. Grewes eo lec'h an iwerzhoneg er pellwel, dreist-holl evit ar re a glask sevel o bugale en iwerzhoneg.

3. Dre ar vro

Hervez lezenn-diazev 1937 ez eo an iwerzhoneg yezh kentañ ar Stad, o vezañ m'eo ar saozneg yezh ofisiel ivez. Gwelet e vez an iwerzhoneg en anvioù kevredigezhioù, war ar panelloù-hent, war ar busoù, ha war panelloù un nebeud stalioù. Ne vez ket graet ganti er ministrerezhioù ha diaes eo kaout paperoù ofisiel en iwerzhoneg (mont a ra war wellaat, met goustad, abaoe m'o deus graet ensaverien zo trouz evit paeañ o zailhoù dre an iwerzhoneg). Ne glask ket an ospitalioù a zo e-kichen ar Gaeltacht implij iwerzhonegerien, met an tiez-bank a ra muioc'h (evel e Breizh).

Deut eo Bibl ar Brotestanted er-maez er XVII^{vet} kantvad; moulet eo bet hini an Iliz katolik e 1978. Diskouezet hon eus penaos he deus dilezet an Iliz katolik ar yezh, e-kerz an XIX^{vet} kantved.

Hiziv e c'hell iwerzhonegerien zo er c'hêrioù hag er Gaeltachtoù klevet an oferenn en o yezh. Met eskibien zo a zo a-enep d'ar yezh, ha fall eo stad an traoù ar Gaeltachtoù bihan hag er gwalam.

Kazetennoù iwerzhonek zo bet moulet abaoe 1882, met kazetennoù evit studieren pe ensaverien e oant peurliesañ (*An Barr Buadh*, savet gant Padraig Mac Piarais, a oa

politikel). Savet eo bet ar gazetenn wirion gentañ e 1934 gant un domad sokialourien. Dont a rac er-maez bep sizhun betek 1937. Inniu, ar gazetenn ar muiañ anavezet marteze, a zeuas er-maez e-pad 40 vloaz (1944-1984), sizhuniek eo bet e-pad 37 bloavezh. Bremañ ez eus ur gazetenn sizhuniek bep Sul (*Anois* = bremañ). War-dro 2.000 skwerenn a vez gwerzhet. Bez' zo 5 kazetenn a deu er-maez bep miz. danvez lenneghez eo a vez enne peurliesañ.

Buhezek-ere eo emsav an iwerzhoneg er c'hwez h'kontelezh an hanternoz: bez' ez eus ur stad e Béal Feirste na vez komzet nemet iwerzhoneg enni, ha savet o deus iwerzhonegerien ar gêr-se ar gazetenn bemdeziek kentañ e 1984-1985, *Lá* (= deiz). Re ziaes eo bet evit rak ne oa ket tu skignañ ar gazetenn dre ar c'henwerzh, met o c'hazetenn o oa kempenn-ere. Dont a ar er-maez c'hoazh p'o devez arc'hant.

N'eo ket gwall vras korn an iwerzhoneg e kazetennoù bras ar vro. Embannet e vez traoù alies war an *Irish Press*, 3 fennad bep sizhun war an *Irish Times*, met dist'er lod ar yezh er c'hazetennoù n'int ket gwelloc'h (ar c'hazetennoù-bro a zo bet enepbroadelour a-viskoazh en Iwerzhon).

Niver al lennerien? Ne vez ket klasket gouzout dre an niveradegoù pet den a lenn iwerzhoneg ingal — goulnnet e vez piv a oar iwerzhoneg evel just. Daoust ma ne vez gwerzhet nemet 2.000 skwerenn eus ar gazetenn vrasañ, kalz muioc'h a dud a oar lenn ar yezh hep poan. Abaoe 10 vloaz ez eus bet ur romant iwerzhonek e penn listenn ar "best-seller" div wezh; ul levr bet embannet e korn-bro Corca Dhuibhne ar bloaz-mañ zo bet gwerzhet 1.000 skwerenn dindan 2 zevezh! Diaesoc'h eo lakaat an iwerzhonegerien a-du war ar



An bhfaca sé an carr ag teacht?

politikerezh ha traoù all, setu perak ne vez lennet ar c'hazetennoù nemet gant ul lodenn anezhe evit pep kazetenn (tu zo da rannañ al lennerien e meur a rummad er c'hefver-se: hervez ar politikerezh, pe tud Gaeltacht/lec'h all, ensaverien pe tud all, tud ar c'hornioù-bro...).

Ma vefent lakaet holl asambles e vefe 20.000 d'an nebeutañ o c'houzout lenn ar yezh hep poan; tu zo da dabul war an niver-se

Peserit kevredigezhioù ar a war-dro ar Gaeltacht hag ar yezh?

Ar ministrerezh evit ar Gaeltacht a zo anezhañ abaoe 1956: ar ministr a ra war-dro ur garg all (pe zaou a-wezhioù) ivez. *Roinn na Gaeltachta* (Rann ar Gaeltacht) a zo karget eus lod eus an arc'hant a vez roet d'an dud eno, ha deus al labour evit difenn ar yezh en tachennoù-se. Burevioù ar Ministrerezh a zo e Dulenn hag er c'hornôg.

Udarás na Gaeltachta (Kuzul-Uhel ar Gaeltacht) a ra war-dro al labouradegoù hag a glask dedennañ ar gapitalourien da zont d'ar Gaeltacht. Ouzhpenn-se e savont kenstrivadegoù evit kêriadennoù ha kevredigezhioù ar Gaeltacht. Er c'hornôg emañ ar burevioù.

Bord na Gaelige (Kuzul an Iwerzhoneg), e Dulenn, a ra war-dro plas an iwerzhoneg er vuhez foran. Reiñ a ra arc'hant evit sevel gouelioù, ober a ra bruderezh evit ar yezh, ober a ra war-dro skignañ al levrioù hag all. £200.000 eo a vez roet dezhañ gant ar Stad bep bloaz. Savet eo bet e 1976 ha dindan ar Stad emañ.

Gael-Linn a ra kentelioù iwerzhoneg e Dulenn ha stajoù er Gaeltacht evit ar re yaouank. Embann a ra pladennoù hag ar gazetenn-Sul *Anois*. Savet eo bet Gael-Linn e 1953.

Conradh na Gaelige a ra skollnoz hag a embann un nebeud levrioù. Deuet eo da vezañ politikel a-walc'h, ha taer e vez alies e-keñver ar gouarnamant.

Conbháil Náisiúnta na Gaelige (Kendael Broadel an Iwerzhoneg) a zo ur burev-kreiz evit an holl gevredigezhioù a ra war-dro ar yezh a-youl-vat. Aozañ a ra gouelioù ha bruderezh dreist-holl. Abaoe m'eo



Tá siad an-mhór le chéile!

bet savet Bord na Gaelige n'eo ket ken bras e bouez.

N'eus nemet ur gevredigezh hag he deus lakaet he burev-kreiz er Gaeltacht, hini ar c'hoariva ez eo.

E-giz Emsav Gwiriou Sivik ar Gaeltacht (1969-1975), diaes eo lavarout pegoulz eo e chuet da vat!), ar strollad *Cumhacht* (Galloud) a zo kreñv er C'honamara dreist-holl. Deut int a-benn da gaout un dileuriad e kuzul Udarás na Gaeltachta hag ur c'huzulier kontelezh (1.700 mouezh). Ober a ra ar strollad war-dro kudennoù ar rannvro-se, hag ar strollad politikel nemetañ a-viskoazh eo a ra gant an iwerzhoneg da gentañ. Strollad ar re vihan eo er vros. N'eo ket en em astennet er-maez eus ar C'honamara nag eus ar Gaeltacht evit mat c'hoazh, met ne ziskouez ket emañ o vont d'en em deuzint evel meur a strollad ruz all er c'horn-se (1935 ha Gwiriou Sivik). Savet eo bet evel ur strollad politikel ha labourat a ra an izilioù p'o devez amzer ha dreist-holl da vare an dilennadegoù.

E-barzh ar pezh hon eus diskouezet e vo kavaet traoù fall ha peadra da gaout spi ivez: dreist-holl ar skolioù bihan, ar gazetenn bemdeziek, ar strollad politikel hag ar "best-sellers".

Stagadenn: An iwerzhoneg er 6 kontelezh.

Marvet eo an iwerzhonegerien a-vihanik diwezhañ er 6 kontelezh n'eus ket pell zo (1950, e Tír Eoghain). Bremañ emañ tud an hanternoz o kas kalz a draoù da benn: gounezet o deus daoust ber BBC evit se. Ar boblañs iwerzhoneger

HOR YEZH

KELAOUENN A YEZHONIEZH savet e 1954 gant Arzel Even Rener: Per Denez

Ouzhpenn 170 niverenn deuet er-maez

— niverennoù all e-maez rummad —

koumanant: 60,00 lur (evit peder niverenn)

Yann Desbordes
1 plasenn Charles-Péguy
29260 Lesneven



TALABAO

ar gazetenn a ra trouz
6 Nnn. 120 lur

hent-dall Kergeleñ
29112 Landudal

DALCHOMP SON!

Kelaoenn istorel vrezhat — trmiziek —

15,00 lur an niverenn
Koumanant: 70,00 lur

36 straed Emik-Zola
56100 an ORIENT

kentañ a zo e Béil Feirste e Sráid Shaw. Koulskoude ne'z a ket re var an traoù dre vras.

6% eus ar vugale gatolik hepken (ha protestant ebet kazimant) a zesk ar yezh er skol (kaset e vez ar skolioù er 6 kontelezh pe gant ar Stad — ar re brotestant, pe gant an Iliz katolik evit ar peurrest). Gwelet hon eus emzalc'h an iliz war ar poent-se c'hoazh.

Abaoe un nebeud bloavezhioù emañ ar republikaned o teskiñ iwerzhoneg start ha par ma c'hellont. Deut eo ar c'hiz eus ar c'hampoù joul-bac'h 'lec'h ma tesk an holl brizonidi republikan (ha lod eus ar gwardoù, dre ret!) iwerzhoneg. Goulenn a ra an emsav republikan gwirioù evit ar yezh en Iwerzhon a-bezh.

Bec'h a zo etreze hag iwerzhonegerien zo na fell ket dezhe e teufe ar yezh da vezañ anvet yezh an deroristed. Daou rumad emsaverien a zo en hanternoz, daou rumad skolioù, hag all: broadelourien virour hag ar republikaned. Trouz ha tabut zo war ar poent-se er c'hreisteiz, rak aon o deus an emsaverien e vefe graet torfedourien anezhe, ha lod o deus aon e lamfe ar gouarnamant ar yalc'hadoù digante (er c'hreisteiz emañ troet an dud dre vras a-enep d'ar republikaned ha d'an IRA evit abegoù a vefe ezhomm re a amzer bremañ evit o displegañ ervat).

Setu adarre an troc'h, etre an dud a ren ur stourm evit ar yezh hag ar vro war un dro eus an tu, hag ar re all a zalc'h d'o yezh evit abegoù liesseurt.

Evel gwechall emañ an nevezenti o tont eus an hanternoz e meur a getver; daoust ma'z eo bihan plas ar yezh eno, n'eo ket bihan he nerzh.

EAMON O CIOSAIN



1968 — 1988

SOKIALOUR HA KEMBREAT

Ned Thomas

Kresket em eus gant ar ger "extremist" dalc'hmat pe dost war va c'hazetenn: Kenya, Kiprenez, Israel, Malaesia, Aden; alies-alies e teue ar ger da vezañ "sponter", hag un deiz neuze ez ae ar gerioù da get ha rener ur stad dizalc'h nevez en em gave e Londrez evit kejañ gant ar rouanez. Moarvat ne fozie ket Breizh-Veur penn-da-benn atav, evel ne oa ket, a-dra-sur, ar gwir ganti atav, hogen an aliesañ edo re bell an den evit gwelout ar stennadurioù, ar c'hlemmoù, ar prederioù a oa en tu all d'ar feulster-hont. "Extremist" o lakae er-maez eus an harzoù, pe gentoc'h, a embanne e oant en em lakaet o-unan er-maez eus kevredigezh an dud fur.


E 1968 hepken eo e klevis implijout ar ger evit envel lod eus va c'henvroiz, Kembreiz. E Londrez edon o chom neuze, ha petra bennak ma voen muioc'h dedennet eget Yann Saoz gant ar bombezennoù o tarzhañ ha gant troioù Arme Dieubidigezh Kembre war ar c'hazetennoù ha war ar skinwel, e tremenas an traoù-se, mui pe vu, en tu all da vevennoù va spred. Ur pennad amzer a oa abaoe ma oan bet o vevañ e bro Gembre, ul lanv a geleier nevez a zeus war-c'horre, n'hell ket unan pakañ e pep lec'h, ha 1968 a voe, memes tra, ar bloavezh ma voe aloubet Tchekoslovakia gant ar Rusianed.

Un diverrañ am eus koulskoude eus ar pezh a soñjis diwar-benn stad politikel bro Gembre, e kement ha ma soñjis enni da nebeutañ. Edon oc'h ober ar gelaouenn rusianek embannet gant gouarnamant

Breizh-Veur evit an Unvaniezh Soviedel, hag en ur pennad gouestlet da eisteddfod bro Gembre e verkis war un dro gant un disheñvelled bras-kenañ diouzh Bro-Saoz er sevenadur, e oa arouezioù o tiskouez edo ar spred broadelour o c'hounit tachenn emsav politikel. Ar c'hentañ kannad broadelour er Parlament a oa bet dilennet, met bez' e oa pemp sez all ha tregont e Kembre, ha ken na gouezhje kalz re all etre daouarn ar vroadelourien, n'helljed ket komz eus ur vroadelouriezh politikel

kreñv. Evidon, adal m'o doa Kembreiz ar gwir da votiñ, edo o dazont etre o daouarn.

E 1969 e teus da chom e Kembre, ha ne voen ket pell o kompren e talvez an implij a raen eus talvoudoù an Demokratielezh Parlamentel saoz da ceunaaat an traoù betek o lakaat da vezañ diwir. Diouzhtu e voen skot gant an treuzwelus ma oa stad politikel ar vro (evel ma teu war wel an eskern, dre ar bannoù X, daoust da gorf tuzum ar strolladoù politikel ha d'an tabut war ar bonreizh). Ar pezh a welen ne oa ket emgann boas ar strolladoù politikel saoz, met ar politikerezh gwir am boa arvestet outañ e-pad ar bloavezhioù ma oan o chom e bro Spagn hag en Unvaniezh Soviedel, ur politikerezh e-lec'h ma oa pouezus-tre kaout an dalc'h war an ensavadurioù, ur politikerezh a redie an dud da guzhat o dibaboù politikel gant aon da vezañ taget en o labour pe, er c'hontrol, o lakae da implijout o micher en un doare politikel.



Ar martezeadenoù dre-vras a ran diwar-benn pouez bras ar frammoù ekonomikel hag ensavadurel, ha diwar-benn pouez dister a-walc'h an Demokratielezh Parlamentel saoz sonnet a-vremañ evit Kembre o doa kalz a liammoù gant marksouriezh vurutellus an tu kleiz nevez saoz. Petra bennak ma vo sellet outo el levr-mañ evel ouzh martezeadenoù, kaset on bet etrezek enno gant ar pezh am eus gwelet e buhez politikel bro Gembre.

Sklaeroc'h e kaven dremm bolitikel wirion Kembre eget hini Bro-Saoz. An abeg eus se eo, tamm pe damm, ar fed ma kemerer muioc'h a berzh enni, hogen stad an traoù a zo kaoz ivez. Anatoe'c'h eo an enebiezhioù e Kembre. Skudenn ar gevredigezh tizhet ganti an oad gour war dachenn an deknologiezh hag a zo degemeret, war-bouez disheñvelderioù dister, gant ar Strollad Mirour koulz ha gant ar Strollad Micherour, a zo diwir, en un doare kalz splannoc'h, en ur vro ma chom an dilabour kalz a-us d'al live boutin, ma tigrisk niver ar postioù-labour a 10.000 bep bloaz (evit ur boblañs a daou vilion hanter), ha ma kuzh niver digemm, pe dost, an dud ar fed ma rank, e pep remziad, ar re yaouank hag ar re varrekañ mont kuit evit kavout labour, tra ma vez kemeret o lec'h gant tud war o leve o tont da chom e kêrioù an aod, tud a c'hell dont eus forzh pe gorm a Vreizh-veur ha n'o deus liamm ebet gant tud ar vro. Ur gevredigezh yac'h a zo gouest da zegemer ur

c'hementad a dud dezho ur sevenadur all, hogen ur gevredigezh a zo bet tennet diganti ar re varrekañ a zeu da vezañ kizidik ouzh kement aloubidigezh (ar mereurioù prenet gant Saozon, an douar prenet Kevredigezh Pesketaerien ur gêr vras eus ar Midlands abalamour ma paot an dluzhed er stêrioù, prenerien tizh-hañv o skarzhañ ar priedoù yaouank diouzh ar marc'had). Ne dalvez da netra embann ez eo Kembre en he fezh un "dachenn da ziorren" pa zalc'h an traoù da vont evel-se gwashoc'h-gwashañ, ha n'hell ket unan mirout a soñjal, en diwezh, n'eo bet ar politikerezh rannvroel nemet un harz dinerzh ouzh ar kapitalouriezh nevez, a zistruj kevredigezhioù denel, n'eo ket evit sevel ur gevredigezh gwelloc'h, diazezet war ar c'hêrioù, met evit ma trofe buanoc'h rodoù an embregerezhioù.

Ur fram lakaet war c'horre ar gevredigezh eo ar skingomz hag ar skinwel en un doare sklaeroc'h-kalz e Kembre, e-lec'h ma vez roet hepken d'ur virorelezh-yezh un niver resis a eurvezhioù-skignañ d'an eurioù an nebeutañ darempredet, tra m'o deus minorelezhioù heñvel, e broioù all e-lec'h m'emañ diazezet ar gevredigezh war ar c'henlabour, ha n'eo ket war ar sujidgezh, ur servij skignerezh a zalc'h kont anezho.

Un arm eus ar galloud politikel eo ivez ar bolis hag al lezioù-barn, en un doare sklaeroc'h-kalz, pa vezont implijet da argas ha da gondaonin tud yaouank o stourm evit ar gwir naturel da gaout panelloù-hent ha paperioù ofisiel e


div yezh ar vro, ha n'eo ket e saozneg hepken.

A-wechoù e seblant Kembre en he fezh bezañ entanet gant un enebadeg na ehuo morse. Liesseurt eo ar pennabegoù a laka an dud da enebin ouzh un dachenn ganolierzh

war aodoù Sir Gaerfyrddin, ouzh liñvadur ur stankenn e-kreiz Kembre, ouzh eil plas ar c'hembraeg er vuhez voutin, ouzh diwezhañ Kuzul Diorren ar Maczioù a-berzh ar gouarnamant evit Kreiz-Kembre. En un derez donoc'h avat ez int liammet, pe e santer ez int liammet, ar pezh a zo an hevelep tra: se eo a laka stourmoù Kembre da vezañ disheñvel diouzh ar stourmoù evit difenn an endro a gaver ivez e lec'hioù zo eus Bro-Saoz; liammet int gant un doare resis a emskiant hag a zo un emskiant vroadel. Bep tro ma tager un dra e tager hengoun Kembre, ar stourm a zo ur stourm en anv un amzer dremenet boutin. Met bez' ez eo ivez ur stourm en anv ar gevredigezh reishoc'h (unan e-lec'h m'o deus an dud muioc'h a c'halloud, hag e-lec'h ma'z int barrekoec'h da ziwall ar pezh a garont).

Ma ne vije broad Kembre nemet un dastumadenn venezidi fallgontant ha meingleuzerion o werzhañ o feadra hag o loc'hañ kuit etrezek ar reter, abalamour m'eo kreizennet ijinerzh Breizh-Veur er riboul Londrez-Manchester, ne vije hor pobl neuze nemet ur strollad all a reuzeudien gwallgaset gant an Istor hep gallout ober netra, hag he stourm ne vije nemet taol skourjez ur virorelezh re bell oc'h en em voazañ ouzh ar bed arnevez. Ma c'hellfed o lakaat da santout ez int Breizhveruz, ha n'eo ket Kembreiz, ma c'hellfed krediñ en rankont kemmnañ o doareoù-bevañ en anv ur gevredigezh gwelloc'h ha reishoc'h, n'o dije abeg ebet d'en em gavout fallgontant. Ar c'hudennoù nemeto a chomje a vije ar goprho o tigriskiñ hag ar sammoù dle da vezañ paeet.

Un intelligenzia vihan gouestlet dezhi he deus bet Kembre en XXvet kantved, skrivagnerien dreist-holl ha n'int ket chomet er-maez eus an dachenn bolitikel; ral a wech e chom skrivagnerien er-maez eus an dachenn bolitikel pa vez dibaboù pouezus-mat da ober. War ar poent-se ivez eo eo disheñvel Kembre diouzh



"Iachennoù da ziorren" all eus Breizh-Veur. E kembraeg ez eo bet displeget ar mennozhioù poellekañ diwar-benn Kembre, ar santadurioù tommañ outi, ha dre al lennegezh kembraek heñvel ouzh e hini, kizidik ouzh e gudennoù, ouzh lodenn ar bed ma vev enni, hag en abeg da se ez eo gouest da reiñ ur ster d'ar pezh a zo c'hoarvezet du-mañ.

Er skol en deus ar C'hembread sellet ouzh an Istor gant daoulagad ur Breizhveuriad. N'en deus ket lennet muioe'h eget se diwar-benn amzer dremenet e vro moarvat. Dezrevell a ra al lennegezh kembraek dezhañ, hervez e lezennoù buhegezel, hervez e gizidigezh, ar pezh a zo c'hoarvezet e Kembre. Ar pezh a zeu war wel ez eo ur framm sevenadurel hollek hag an diouer anezhañ. Muioe'h-mui e klevomp el lennegezh kembraek ton an dizesper, a zo hini an harozelezh ivez, ha displegadur un nebeud talvoudoù a zo diwanet e-pad un istor leun a stourmoù, a-enep perc'henniezh an aotrounez da gentañ, a-enep ar gaptalouriezh, ha

bremañ a-enep ar Stad vurevezhel arvez. Ar yezh a stag an dud ouzh ar saverien mennozhioù hag ar gentel a glevont, hag a rankont klevout ez-leal, eo emañ Kembre dirak he c'hañs diwezhañ da vevañ.

N'eo ket ar pezh a ra denn d'hor buhez-ni hepken a ra nerzh al lennegezh kembraek gwellañ: dougen a ra enni uhelvennad ur gevredigezh seven ha denel, a dalvez ivez evit an dud e lec'hioù all. Abalamour d'he ment dister ez eo kizidik-dreist ar gevredigezh kembraeg ouzh an distrujadeg diboaell a vez kaset da benn e pep lec'h en anv ar reizh armerzhel. Ar gwaskerezhioù a bouez wamomp holl, a bouez war ar sevenadur kembraek betek e beurlazhañ. Er c'horn war e ziskar-mañ eus bed ar gaptalouriezh arvez hag ar vurevelezh ez eus un emgann dister evit an denelezh a vez renet, hag a vez renet gant un tamm mat a ijin. Dispac'hel eo skrivagneriek kembraek meur ar

c'hantved-mañ hag ivez al luskadoù a zo bet levezonet ganto, n'eo ket hervez ster diouzh ar c'hiz ar ger, met hervez e ster don ha gwir, a dalvez e tagont ar sistem en e bezh.

Ar gudenn eo gouzout hag ur gevredigezh vihan, gant he yezh, he sevenadur hag he zalvoudoù, gant he hêrezh lennegezh ha speredel, gant he doare dezhi da sellout ouzh ar bed, a c'hell derec'helda vevañ en enezennoù-mañ. Evit ma vije greñs e ranko kalz emzalc'hioù ha kalz ensavadurioù bezañ kemmet, rak emañ frammoù an amzer-vremañ o kas ar gevredigezh-se da get. Ha ma n'eo ket gouest Breizh-Veur da ziwall gwir an dud da vevañ e diabarzh o sevenadur-int, arabat eo dezhi neuze kredañ e vo gwall sellus an dud evit pezh a sell ouzh hec'h ensavadurioù demokratel.

Pa gomzan gant Saozon eus broadelouriezh Kembre en em gavan paket en un tabut diziwezh diwar-benn ar bonreizhoù, an harzoù-bro hag ar gwirioù deveret diouzh kenstagidigezh ar broioù. Gard omp rediet da bledañ ganto e teuo ar poentoù-se da vezañ pouezus, hogen n'emaint ket er penn-kentañ, n'eus ket anezho c'ienenn an donañ hag ar

youlekañ santad. Nep piv bennak a gred ez eo aze emañ an dalc'h a vez souezhet, gant gwir abeg, pa fell da unan tizhout seurt paliou gant doareoù feuls. Ne gomz ket an dud a vervel evit Kembre (bez' ez eus tud yaouank o komz evel-se) abalamour d'ur Parlamant a rankfed sevel e Kêrdiz pe evit kaout an arouezioù a veurda e zo merk ur vroad ofisiel, hogen abalamour ma welont ur yezh, ur sevenadur hag ur bersonelezh o vezañ skubet kuit diouzh gorre ar bed, hag abalamour ma ne gredont ket ken e c'heller ober gant doareoù an Demokratielezh saoz evit enebañ ouzh se.

Kennerzhus eo kavout ur gevredigezh e-lec'h m'o deus an dibabou politikel trawalc'h a bouez evit lakaat dizemglevioù gwirion da sevel, met nec'hus eo war un dro. Ar framm kembraek a zo unan e-lec'h m'en deus ar stourm, hep mar, hag ar feulster, moarvat, ul lec'h reizh.

Sañset eo ar ger "extremist" termeniñ an doareoù ober ha n'eo ket ar savpontoù. Tenn eo avat dispartiañ war an dachenn an doareoù "extremist" diouzh an enkadennoù strishañ, diouzh ar gwaskerezhioù pounerañ. N'eus nemet ar rikañ peoc'hgarour a lavaro: "Extremisted hungariat o deustalet bombezennoù-eoul war ar c'hirri-brezel rusian e Budapest," abalamour ma kredomp e stourme an dud-se evit un dra omp kizidik outañ ha ne c'helle ket bezañ difennet gant doareoù all.

Implijout ar feulster evit tizhout paliou politikel a ziskouez e pep lec'h ez eo ermet ur bobl d'ur poent ma ne wel dor all ebet da vont er-maez. N'eo ket siwazh un demokratielezh parlamant drezi hec'h-unan ur broeuenn diogel ma vo diourestlet ar c'hudemoù kevredigezhel en un doare peoc'hus atav ha ma vo barnet dre ret pep tra en un doare reizh. Pa vez anv eus feulster ar re zu er Stadoù-Unanet e sellomp ouzh an tabut dre e abeg istorel ha dre frammadur an armerzh hag ar gevredigezh; heñvel eo evit pezh a sell ouzh hanternoz Iwerzhon. Betek-henn, evit pezh a sell ouzh Kembre, hon eus komzet evel pa vije enni un domad tud oc'h ober gant doareoù feuls pe o sevel o mouezh a-du gant ar feulster, anezho ul luskad soñjerien digenvez a-grenn, hep ket a bouez sokial hollek.

D'ar 1añ a viz Gouere 1969, en nozvezh a-raok Emwiskadur Prits

Kembre e tarzhas daou Gembread yaouank, dre wallzarvoud moarvat, p'edont o lakaat ur vombezenn e burevioù ar gouamamant en Abergele. Ne voe nemet un darvoud dispis evit kelaoennoù Bro-Saoz, beuzet buan gant lanv ar c'heleier priñsel. Ne voe ket avat ar c'helaouennoù kembraek hep merzout, evel ma reas Kembreiz kizidik, petra bennak ma oant diret, petra bennak ma oant dihetent, e oa an daou varv-se an daou varv kentañ en anv an emsav broadelour kembraek. Hon trostaat a rejont ouzh un drajedenn vroadel hollek. Meizañ a reas ar c'helaouennoù un nec'hamant hag ur c'hwervoni nevez e spered ar gembraegerien. N'hellemp ket lavarout n'o doa ket ar marvioù-se a zarempred ganeomp ha gant stad hor bro. Pet marv c'hoazh ha pet den mac'hagnet, evel Ian Cox, ar skoliad gloazet p'edo oc'h arvestiñ ouzh an Emwiskadur e Caernafon, hor bo ez-homm a-raok na grogimp da c'houlenn ha n'eus ket e Kembre gaou ha disleaded en hor c'heñver ken don ma ne c'hellont ket bezañ diouesit gant an dilennadegoù hepken?

Goulakadurioù a vez kuzhet bepred dindan ar ger "extremist". Ar pezh hon eus e Kembre, hag e-touez ar gembraegerien dreist-holl, a zo ur strafuilh bras hag ivez an diouer a esaoc'h d'e bareañ. Kizidik pe gizidikoc'h e vez an dud ouzh ar gwaskerezh. Hiriv emañ unan a-du gant al labour hervez al Lezenn, hogen warc'hoazh e savo a-du gant

an oberantuz er-maez anezhi. Tud zo a c'hell dont da gredañ ez eo ar feulster a-enep ar berc'henniezh un arm reizh hag oberiant. Un nebeud taolioù diskiant c'hoazh, evel re ar bolis e-kreiz Kembre en hafv 1969, un nebeud taolioù-arnod diampart c'hoazh, evel re Arme Djeubidigezh Kembre, hag e kler e spered un nebeud Kembreiz ouzhpenn.

E-giz forzh pe gevredigezh vroadel all ez eo kevredigezh ar gembraegerien ur strollad a strolladoù oc'h en em astenn an eil re war ar re all, ha lod en em astenn war dachenn ar Gembread na gomzont ket kembraeg. Bez' ez eus izili ar Plaid Cymru hag a vez nec'het gant taolioù-nerzh Kevredigezh ar Yezh ha re all hag a sav a-du ganto. Nec'het eo Kevredigezh ar Yezh hec'h-unan gant ar feulster, ha padal hec'h izili o doa dastumet argant evit tiegezhioù an daou zen a varvas e tarzhadenn Abergele. N'eus strollad ebet hag a vefe digeflusk: atav e vez an dud o vont-dont war vevannoù seurt strolladoù, ha forzh piv a c'hell kompren abegoù an dud, tommañ outo, petra bennak ma ne savont ket a-du gant o oberoù. Pezh emañ o lavarout eta eo ez eo heñvel izili ur vroad ouzh izili un tiegezh; daoust d'o zabutoù ha d'o disheñvelderioù ez en em anavezont gwelloc'h eget nikun en diavaez, ha liammet int gant un doare karantez.

Displeget eo bet kement-se gwelloc'h eget ne c'hellfen hen ober



en ul lizher kaset d'ar gelaouenn sizhuniek Y Faner gant an D. Bobi Jones, barzh ha prezeger kembraek e Skol-Veur Aberystwyth. Difenn a rae e grog er varzhoneg en doa savet diwar-benn an daou zen lazhet en Abergel:

«Broadelour on gant va fluenn, peoc'harour on em c'hador. Ne gredan ket ez eo ar feulster un dra reizh. Pa vez anv a bennabegoù ez em renkan siouliek e-mesk an darn vrasañ eus an dud diogel, doñv, delzelek a zoujañs, hag a gred ez eo dañjerus an tarzhadennoù: bez' e youc'hin: "Gant ar vezh!" a-gevret gant an engreiz.

Nann, ne savan ket a-du gant ar baotred-se, ha ma vefent amañ dirazon ha me em c'hador, e lavarfen kement-se dezho, reut va divskoaz, hep an disterañ aon. N'emaint ket amañ avat evit tabutal war martezeadennoù a-zivout an doare gwellañ da zieubiñ bro Gembre... Kiriek eo eus an daou varv-se nep piv bennak en deus degaset an disterañ skoazell da sujidigezh danvezel ha speredel Kembre. Kiriek eo nep piv bennak a zo chomet digas. Kiriek eo nep piv bennak en deus gouzañvet termaji bras Caernarfon. Kiriek eo zoken nep piv bennak en deus pleustret evit tennañ Kembre diouzh ar sklaverezh... Dizereat e vefe klask bezañ fur dirak un degouezh evel hemañ, a zo un dra nevez en istor Kembre an amzer vremañ. Ha ni, gwaskedet-klok gant al Lezenn, na gollomp ket hon perzhioù denel, na chomomp ket dall dirak an diforc'h spontus a zo etrezomp hag ar re a lak o buhez en arvar — hag a goll anezhi.»

Al lizher-mañ, ha n'hellan nemet sevel a-du gantañ, a ziskouez splann penaos e vez kontammet sell an dud ouz ar bed pa vez implijet ar feulster. N'eo ket hepken afer ar re o deus kaset an taolioù-feuls da benn. Kalz muioù ha a dud, e doare pe zoare, a sav a-du ganto. Ne vefent ket-me evit flatrañ d'ar polis ur C'hembread en dije lakaet ur vombezenn en un tu bennak. Re vat e komprenfen pezh en deus e rediet d'ober kement-se. Den kennebeut ne c'hell difenn ar soñj e lak ar feulster ar vroadelourtezh hervez lezenn da gilañ. Lavarout se, n'eo nemet ur gau hag a zo gwelloc'h koulz d'ar strolladoù politikel saoz ha d'ar Plaid Cymru distagañ. Niverusoc'h eo bet

e gwirionez gounidoù Kembre, ken e-keñver ar gwirioù politikel, ken e-keñver ar yezh, d'ar mare ma yac niver an tarzhadennoù war greskiñ. Hag adal ma ya unan betek nac'hañ ar feulster abalamour d'ar "Mennoz", petra bennak ma sav a-du gantañ evit pezh a sell an oberoù, e teu da vezañ tenn-meurbet da zispartañ ar "Mennoz"-se diouzh al laoskentez.

Skoazellañ stourm difeuls dre zisenti-digezhkoeddel-kevrredigezh ar Yezh a zo, d'am meno, an dibab spletañ evit ur C'hembread onest. Ne dagont den etreget difennoù ar galloud. Ar Gwir a ziwallont, e

lavaret diwar-benn doareoù ha skiantvat Arme Dieubidigezh Kembre. Pezh a zekas an darvoud din avat, daoust m'hen greas en un doare gwall arouezel, eo talvoudegezh ar ger *polarization* (= kenaheladur). Pa'z erru ur stourmad d'ar poent-mañ-poent, ez en em gavet en hevelep tu ha tud n'oc'h ket a-du ganto.

Un den digor eo Yann-Saoz dre natur. Ne gompren ket perak ez eus bombezennoù o tarzhañ ha taolioù-nerzh e bro Gembre. Dedennet eo gant ar c'hembraeg ha ne gompren ket na gant piv na gant petra ez eo taget hemañ. Betek-henn ez eo bet ar c'hembraeger, ha pa vije bet ur

broadelour anezhañ, un den habask dre natur. En un tu bennak etrezo ez eus savet ur frammadur-galloud politikel hag armerzhel a laka an eil d'en em santout gwasket gant egile, betek kemer perzh a-wechoù en ur stourmad feuls.

Bez' ez eus ur seurt Saoz, hag a c'hell bezañ ur seurt mirour, daoust ma sell outañ an aliesañ kentoc'h evel ouz ur sokialour, hag a zo dedennet, n'eo ket gant ar galloud hag ar braster, hogen gant gwellaat ar vuhez; lennet en deus hemañ Leavis, Lawrence, Forster, Orwell hag e kompren ervat ez eus eus ur yezh un dra a venn an dud mirout gant gwir abeg, ez eus eus ur gevredigezh, n'eo ket an dra en deus an den keuz outañ p'eo bet kollet, er c'héριοù bras hag en Hl.Moù, hogen un dra e rank an den magañ karantez outañ p'en deus anezhañ; dispac' herawalc'h eo hemañ evit kredif e c'hell an traoù bezañ kemmet, evit kredif e c'hellomp ijinañ un dra gwelloc'h eget hor c'hevredigezh a-vremañ ha mont etrezek ennañ, gwev a-walc'h eo spered hemañ evit kompren ne zegouezh ket bepred an torradurioù bihan en demelezh e-lec'h m'edod ouz o gortoz pe gant ar banieloù ruz kozh o vont d'an emgann er stradoù stanket gant bardelloù.

Evit ar Saoz-se end-eeun eo bet savet va levr. N'hell ket douetiñ emañ e vreur eus ar gevredigezh kembraeger, eus ar c'hultur kembraek zoken, dalc'het gant ur frammadur-galloud proviñsel eus ar seurt ma ra-ef e-unan fac warno. Betek an deiz ma'z a io ar c'hembraeg da get, e tale'ho begenn pep remziad kembraegerien da stourm, n'eo ket abalamour ma'z eo strizh o spered, n'eo ket abalamour m'en em santont divarek o-unan da vezañ izili ur gevredigezh ledanoc'h ha bedel, hogen abalamour n'hellit ket kemer perzh er gevredigezh ledanoc'h-se, na kemer perzh e stourmadoù buhezegezhel ar bed, ha, war un dro, degemer war dreuzoù ho ti e vefe nac'het ouzhoc'h ho personed a gevredigezh ha talvoudegezh ar c'hantvedoù en em led a-dreñv deoc'h.

(Pennad tennet eus *The Welsh Extremist*, gant Ned Thomas, © Y Lolfa 1971, troidigezh gant *Al Lann*)

SEITEK HA PEVAR-UGENT PIK PEMP mouezh Breizh e Bro-Naoned

Kenderc'hel a reomp gant an droiad e bro ar c'hreisteiz boulc'het ganeomp war *Al Lann* 44. Ar wech-mañ ez omp aet da welout Tangi Manac'h evit komz eus *Radio-Alternantes* (ur skingomz lakaet war-sav gant ar C'h.U.A.B.) hag eus an abadenn vrezhonek Naonediz, "Kanevedenn".

Al Lann: Ar skingomzoù dieub a zo un hengoun e Naoned?
Tangi Manac'h: Ya, kozh a-walc'h eo al luskad-se e Naoned. A-raok 1981 dija e oa ur radio ekolojisted, ha goude dieubidigezh ar skingomzoù ez eo deuet da vezañ Radio-Atlantel (Radio-Atlantic). Ne oa ket ur skingomz evel ma'z eus bremañ, NRJ pe HIT-FM, radioioù kenwerzhel a zo o fal gounit ar c'hant. Savet e oa bet Radio-

Atlantel gant ur skipailh tud o doa c'hoant kelaouiñ an dud, reiñ lañs d'ar vuhez kevredigezhel, dre ober pennadoù-kaoz, pedif an dud a rae war-dro ar sevenadur, tud divroet, emsaverien, tud ar minorelezhioù all, ar strolladoù bihan, — hag ivez kinnig ur sonerezh disheñvel, muioù ha sonerezh e galleg, sonerezh ar broioù dianav, Portugal, Bro-Spagn, h.a.
Soñj em eus bezañ klevet un abadenn diwar-benn ar flamenco, ar paotr a rae war-dro an abadenn a zegase e zastumad pladennoù.
Un dra a zo disheñvel-tre diouzh ar pezh a zo bremañ e-barzh program ar radioioù kenwerzhourel eo e veze rannet ar sizhunvezh etre lodennoù; bez' e veze un den pe zaou oc'h ober war-dro un abadenn resis: unan diwar-benn Bro-Portugal, savet gant



Kembre, evit ar gevredigezh hag evit ar saoznegerien. N'eo ket an disenti-digezh keodedel un dirbin risklus o kas d'ar feulster, un dibab all eo, gant ma vo tud a-walc'h o kemer perzh enni, dezhi da vezañ frouezhus.

E-pad an hañv, e 1969, e tremenis dre Abertawe hag ez arvestis eno ouz un abardaevezhiad eus prosez dizivezh Arme Dieubidigezh Kembre. Edo dres ar prosez oc'h adkregiñ ha, tra ma'z antree an damallidi er sal, e savas an div drederenn eus an arvesterien, pe dost, en o sav hag en em lakaat da ganañ kan broadel bro Gembre. E-pad ul lajadig en em c'houlennis petra a rajon. Sevel a ris, evel just, hag e sellas pizh ouzhen, evel ouz ar re all, un hanter dousennad archerien bennak a oa en o sav dirak ar varmerien. Nebeut a dra am eus da

AL LIAMM




KELAOUENN LENNEGEL
BEP DAOU VIZ

Koumanant-bloaz 120 lit
studieren, vroadel, tud dijabbour 100 lit

has ar chek-kennou id.

P. Le Bihan
16 rue des Faoues & Cloux
35400 SAINT MALO
CCP 5549 04 A Paris





divroidi, unan all war ar jazz, unan all war ar firtskedennerezh... Pep hini a selaeou ouzh an abaden gouestlet d'an danvez a blijje dezhañ, ha, bep un tammig, e teue da vezafi dedennet ivez gant traoù n'anaveze ket a-raok.

Perak en deus Radio-Atlantel paouezet da skignañ abadennoù?

Abalamour da gudennoù arc'hant, me 'gav din. E-tro 1983 ez eus diwanet radioioù evel NRJ pe HIT-FM a oa o fal gouini arc'hant hag a implije bruderezh a-leizh, pezh ne veze ket graet gant Radio-Atlantel. Hervez al lezenn e oa daou seurt radio, unan oc'h ober gant bruderezh, hag unan all hep bruderezh hag hemañ a oa gopret gant ar Stad, sañset. Met pep hini a oa euzhus-kenañ ar Stad pa'z eus anv a reiñ arc'hant dezhi hag ez eo un afer all pa'z eus kaoz a zegemer arc'hant diganti! Evel-se, enta, eo bet digalonekaet skipailh Radio-Atlantel. Ouzhpenn-se, ne veze ket selaeout Radio-Atlantel kement hag ar skingomzoù all, a oa pinvidik-mor, evel just, hag o doa arc'hant evit sevel peulioù-skignañ

bras-spontus, hag ivez d'ober bruderezh e kreiz-kêr, skritelloù hag all. Ur seurt kenstrivañ e oa, a anavezomp hiziv c'hoazh. Lavaromp ivez e oa sikouret mont en-dro ar skingomz gant an tiez-kêr nemet gant tud ar Strollad Sokialour (PS), en Orvez hag e Naoned. Gant tonnen an tu-dehou e c'hériori-se e-kerz dilennadegoù 1984 eo bet dilezet politikerezh ar yalc'hadou, evit ur radio tostoc'h d'an tu kleiz, ouzhpenn! Ne oa ket tu d'un nebeud tud a youl vat, goulo o chakodoù ouzhpenn, dere'hel penn. Da skouer ez eus ur radio, *Radio-Atlantel*, staliet e Vande, war Venez an Alc'hwedered, hag a vez klevet, sañset, betek Loudieg. Seurt radioioù a zo e-maez al lezenn, anat, dre ma'z eo an Ao. de Villiers an hini en deus savet ar skingomz-se, hag hennezh a zo e penn ar P.R., a zo bet ministr, n'eus ket tu dere'hel penn ouzh ur paotr evel-se. Seurt skingomzoù a zo embregerezhioù e gwirionez, gant tud o labourat er marketing, gant kazetennierien gopret hag a-vicher. Setu perak eo aet Radio-Atlantel da

get.

Ha perak, neuze, sevel ur radio all. Goude bezañ bet klevet pezh am eus lavaret bremaik, e c'hellfed soñjal, o welet an taol-esa c'hwitet, e vefe arvarus sevel ur radio-kelaouñ all. Ur c'hlaouster eo ivez. Bez' e c'heller soñjal ez eo aet skuih an dud o klevout abadennoù ar radioioù kenwerzhouriel, NRJ, HIT-FM, pe Europel zoken, da lavarout eo bruderezh ha sonerezh, ar memes sonerezh atav, ur seurt milin-sonerezh, ur seurt milin-bruderezh. Chefechet eo spered an dud; gwelout a reomp sklaer a-walc'h ez eus tud o selaeu ar skingomzoù kenwerzhouriel met ur rummad tud dreist ar re all a zo leal dezhe, kalz anezho etre 13 ha 25 bloaz, ar yaouankizoù "luget"-mat (branché). Bez' ez eus tud all, avat, ha n'emaint ket er rummad-se, hag a vefe ur marc'had evit ur radio en dije programoù nevez, disheñvel. Atav e c'heller selaeouerien "Alternantes" kemmñ niver ar gwagennoù evit selaeou sonerezh kenwerzhouriel. Pal "Alternantes" a zo kinnig un dibab, kinnig danvezioù na vezont ket kavet betek-hen gant ar radioioù all, peogwir hon eus meizet e veze goulnennet un dra all.

Bez' ez eus abegoù all a sell ouzh saverien "Alternantes", tud ar C'h.U.A.B. Ret eo gouzout un dra ha ne vez ket anavezet er-maez eus bro Naoned, ha plijet an da gaut an tu d'hel lavarout. Tud ar rannvro "Bretagne" a zo techet da grediñ e chom Breizhiz tud bro Naoned, daoust ma n'emaint ket er rannvro "Bretagne", e c'hellont bevañ e brezhoneg, mont d'ar festoù-noz,

h.a. Evit tud rannvro "Bretagne" e c'hellompkenderc'hele-mod-sea-hed hor buhez, ne cheñcho ket an trañ. Pezh ne vez ket lavaret avat eo e vez graet bruderezh enepbreizhek, "propaganda" e-giz ma vez lavaret en almaneg, gant ar Stad, ar paperioù ofisiel, evel just, met ivez gant ar mediaoù, ar c'hazetennoù, ar skingomzoù... Evit *Presse-Océan* ez eo al Liger-Atlantel ul lodenn eus ar Vande, evit *Ouest-Torch* ez eo kentoc'h "Roazon kêrbenn ar bed", pep tra estreget Roazon a zo didalvoud. Aes eo hen merzout. Ur fest-noz a zo bet aozet gant ar Re C'has, evit dastum arc'hant evit ar Radio; er pennad embannet war *Ouest-Torch* e lennomp: «À l'appel

de l'association Nantes-Écologie, plus de mille jeunes venus des quatre coins de la Bretagne et des Pays-de-Loire...», Traoù e-mod-se a lennomp bemdez-bemdez, komzet e vez eus «les "cinq" départements» pe eus «Monsieur Machin nous a parlé de l'histoire de notre région, les Pays-de-Loire», e-lec'h "Breizh", evel-just... Da lavaret eo faziou, faziou graet a-razozh. Komz a reer eus Machikoul pe eus Kernevez hag e lavarer: "ur barrez a vro Vande". Se a zo gau, gaou-rik.

Bez' ez eus ur voger, evel etre an div Alamagn, etre bro Naoned ha bro Wened pe bro Roazon. Anavezout a reomp mat-tre pezh a c'hoarvez e kreisteiz ar Vande, pe e hanternoz ar Mayenne, met den, e bro Naoned, ne oar pezh a c'hoarvez

e Reudon... Setu perak ez eus bet divizet sevel "Alternantes", evit respont d'ar goulnenn war geleier a denne da Vreizh, peogwir er c'hazetennoù hag er radioioù all ne oa mann, mann ebet. Hor pal, enta, a oa dastum keleier war ar pemp departamant evit kelaouñ tud bro Naoned. E raktesoù ar radio e oa bet divizet sevel un doare "roued", gant mignonned strewet un tammig e pep lec'h e Breizh evit bezañ kelaouenner ar radio. N'eo ket bet savet betek-henn; bremañ e labouromp a ziwar kazetennoù, gant skingomzoù all hag e kasomp enklaskerien war an dachenn. Prenañ a reomp ar c'hazetennoù a vez embannet e Roazon hag e lec'h all, *Ouest-France*, *Le Télégramme*, *Le Trégor*.

Bez' ez eus pennadoù dereat war *Ouest Torch*, met hepken en embannadurioù ar Mor-Bihan pe an Il-ha-Gwinun; (...) e Naoned, pa'z eus anezho, e vezont fall a-walc'h.

Anv a zo bet eus an div darzhadenn, e miz Genver?

Evit ur wech ez eus bet kaoz eus ur seurt darvoud, moarvat abalamour ma'z eus bet digoret ur skol Diwan e Naoned e miz Gwengolo... Dres, pa vez komzet eus Bretoned hag eus Breizh e *Ouest-Torch* bro Naoned, e klot breped gant tarzhadennoù, manifestadegoù munut un nebeud emsaverien, hag ivez niver al lonkenier e Mor-Bihan. Reiñ a reont ur skudenn unteuk-tre eus ar Vretoned...

Koll a rit ar c'heleier diwar-benn ar

Dielloù

- Pedet e voe ur brezhoneger bet o veajiñ en Afganistan d'ober ur brezegenn evit Strollad Brezhonegerien Bro-Naoned. Kaset e voe ur gemennadenn da *Ouest-France* Naoned. E galleg e oa, nemet ul linennad vrezhoneg e penn-kentañ. Ne voe ket embannet. Gwell e kavas paotred O.F. sevel ur pennad bihan a ginnigomp amañ hag a ziskouez, anat, gredennoù e c'hell ur c'hazetenn bezañ.
- E Kastell an Duged e vez roet d'ar welaenderien ur follenn-zisplegañ. Un nebeud bloavezhioù oa e oa bet lakaet e nousep yezh hag, evit pezh a sell ouzh ar brezhoneg, e oa bet goulnennet skoazell digant ar gevredigezh *Anna Vreizh*, a zeuas, diwezhatoc'h, da vout *Strollad Brezhonegerien Bro-Naoned*. Pa voe kaset al labour da vat, embannet ar follennoù, e voe kouvietañ an holl da charinkañ ur fistolenn war an ton bras, — d'ur c'hocktail enta. Setu amañ al lizher a voe kaset, eus Kastell Duged Vreizh, da "Madame Vreizh Anna".

Kenavo

Afghanistan

2

Goude bazan tremenet daou viz en Afghanistan evit kas louzou du-hont... Si vous n'avez pas compris, ne vous désespérez pas... Vous n'êtes pas le seul. Moi, par exemple, journaliste viking, découragé par cette langue dont je ne comprends pas le premier mot, j'ai parcouru cette lettre annonçant une conférence sur l'Afghanistan sans aller jusqu'au bout. Résultat : cette conférence n'a pas été annoncée. Véritable infidélité à l'association des Bretonnans de Loire-Atlantique qui invitait jeudi Hervé Frangouil pour témoigner à son retour d'Afghanistan. Intéressant à condition de comprendre : la discussion se faisait en breton. Sans doute pour tromper les espions russes...

Musées du Château des Ducs de Bretagne

Ville de Nantes
1 place Marc-Elder, 44000 Nantes

STROLLAD BREZHONEGERIEN BRO-NAONED

Madame VREIZH Anna

Rue Harounys

44000 NANTES

1
D

vuhez sevenadurel ha kevredigezhel. Ya, Pal "Alternantes" enta a oa reñt ar c'heleier na vezont ket kavet war Ouest-Torch bro Naoned. Komz a reer altes eus unwerzhouriezh [monopole] Hersant (ur Breizhad anezhañ, ganet e Gwerzhav [Vertou] hogen e Naoned hag e Breizh a-bezh ez eo Ouest-Torch ken gwazh all, Ouest-Torch a dalvez ouzhpenn 50% eus marc'had ar c'hazetennoù pemdeziek.

Bez' e oa ur gelaouenn all e Naoned, ur gelaouenn sishuniek: "La Tribune".

Ya, met aet eo da get ur miz zo, dre ziouer a arc'hant. Ne oa ket ur gazetenn fall-tre, moan a-walc'h e veze an danvez a-wechoù. Ingal e skoazelle pennoù ar Strollad Sokialour gall ar gazetenn, gant tierker evel Reziq [Rezé] pe Sant Hermelen, pezh a veze anzavet, hep mez. Pa'z eo aet skuizh ar skoazellerien o reñt arc'hant en deus ranket ar skipailh serrañ doriou ar burevioù.

Kresket eo talvoudegezh "Alternantes" neuze?

Ya, moarvat... Pa'z eo bet savet "Alternantes" ez eus bet divizet chom er-maez eus an dachenn genwerzhouriel, bruderezh ebet. Da gentañ, peogwir hor pal a oa kinnig un dra bennak all, hag ouzhpenn, peogwir ne vijemp ket bet gouest da genstrivañ gant radioioù evel NRJ pe HIT-FM. Reñt arc'hant d'ur paour-kaezh radio evel "Alternantes", selaouet gant nebeut a dud (d.l.e. nebeutoc'h egeto), klevet nemet e Naoned, a vije bet un toull hag un toull ivez evit ar genwerzhourien. N'hon eus ket bet c'hoant degemer ar bruderezh war hor gwagennoù ha ne vijemp ket bet gouest d'hen ober. Abalamour da se ez eo bet dibabet ar statud a radio prevez kevredigezhel hag a zo aotreet gant al lezenn (hini 1981? Ne'm eus ket soñj, n'on ket gwall ouizieq war al lezennoù hag ouzhpenn e vez cheñchet pep tra altes a-walc'h). Hervez al lezenn, avat, p'eo kevredigezhel ar radio, e vez degemeret arc'hant digant ar Stad, un 10 milion bennak, pouner eo ar yalc'h, safset. Met n'emañ ket war-wel c'hoazh, emaoimp atav o c'hortoz...

Pegoulz eo bet krouet "Alternantes"? Krouet eo bet e miz Mae 1987, tost d'ur bloaz zo. Ne ouzomp ket kennebeut hag ez eo bet degemeret ar radio gant ar C'huzul-Meur a zo e

penn ar Skignerezh e Bro-C'hall; ar gevredigezh "Radio Alternantes" a zo disklêriet evel forzh peseurt kevredigezh, met n'hon eus ket bet kelou eus an aotre da skignañ. Forzh penaos e kendalc'homp. Bruderez ebet, skodenn ar Stad arvarus... hag e rankomp mont endro memes tra. Arc'hant a oa ezhomm evit melestradur ar radio, evit goprañ TUced pe objektourien, evit goprañ ur rener, hag a zo Ronan Danteg (eñ an hini eo en deus kaset ar raktres war-raok). Soñjet hon eus goulnenn arc'hant digant ar selaouerien, ha pouezañ war an drase. Anavezet eo pezh a ra J.F. Kahn, a zo e penn L'Événement du Jeudi (Darvoud ar Yaou); kevala ar gazetenn-se, rannet etre kenlodennoù, a vez prenet gant al lennerien, un doare eo da chom hep kemer perzh e meskachoù ar bed politikel ha kenwerzhouriel. Se an hini eo a zo bet graet gant "Radio-Alternantes". E-pad ar festoù-noz, e-pad an abadennoù sonerezh a zo bet aozet abaoe c'hwec'h miz, ez eus bet goulnennet digant an dud prenañ kenlodennoù dre gas 50lur bep trimiziad, e-pad ur bloavezh, d'ar radio da vont endro. En eskemm e veze roet un digresk war briz an abadennoù aozet gant "Alternantes", — da skouer ar fest-noz aozet e miz Du e sal Laurenn al Lu (Champ de

Mars) hag en deus bodet tost da 2.000 den.

Bez' e c'heller, anat, selaou ouzh ar radio hep paeañ tra. Evidomp avat ez eo "Alternantes" ur servij roet d'an dud; n'eus skingomz all ebet e Naoned a c'hell degas ar servij-se, da lavaret eo: ur servij kelaouiñ, ur servij ivez e-keñver ar sonerezh, a zo dibar, hag ouzhpenn, evit ar re a fell dezho sevel un abadenñ bep sizhun, an tu da bleustrañ war ar radio; tud evel-se o deus kroget gant abadennoù, Portugaliz o kinnig un abadenñ e portugaleg, kristenien CCFD o kinnig un abadenñ war an trede-bed, h.a. 3.000lur evit un eurvezh e-pad ur bloavezh a c'houlennomp digant pep kevredigezh. An arc'hant-se a zo ur respont d'ar servij a roomp d'an dud. Betek-henn hon devez 3.500lur bep miz e-giz-se, peadra da vont endro. Evel-just e tegouezh kudennoù

teknik bep ar mare, bez' e rankomp prenañ ar c'hazetennoù bemdez!!! Met, da'm meno, ez eo mat bezañ chomet bev abaoe miz Mae '87, tost d'ur bloavezh, hep bruderezh hag hep skoazell.


Koustañ 'ra ker lakaat ur skingomz da vont endro?

Ret eo da gentañ prenañ an ardivinkoù. Ar peul-skingomz a zo koustus a-walc'h; bez' ez eus ardivinkoù-skignañ a c'hell skignañ war un dachenn ledan-tre, evel hini Radio-Alouettes ha lod all a dalvez evit ur c'harter hepken, seul belloc'h e ya, seul geroc'h e koust, da brenañ, da gentañ, ha da vont endro da c'houde... Hon hini a zo 400 watt,

klevet e vezomp e Naoned dre vras ha betek Groanloc'h [Grandlieu]. Ret eo bet ivez prenañ un daol-veskañ, evit ar pladennoù hag ar c'hasedigoù. Ret eo bet ivez feurmifit ul lec'h. Bez' ez eus lec'hioù uhel, evel rannioù Tour Breizh hag all, met ker-ruz ez int. Ezhomm hon doa eus ul lec'h ledan a-walc'h, deomp da labourat, da brientañ an abadennoù hag ivez da zegemer tud. Kement-se en deus koustet war-dro 9 milion a luriou gall kozh.

Bez' ez eus ivez frejoù ar mont endro, bep miz: ar feurm, an tredan, ar pellgomz, ar goprou hag ivez gwirioù ar SACEM evit ar sonerezh a lonk 10% eus hor budjet...

Daouhanteret eo bet ar c'hevaladiaz, ar 6 milion a luriou, etre ar C'hUAB hag ar strollad ekolojisted anvet "Nantes-Ecologie". E penn ar radio emañ Ronan Danteg, a zo rener ar C'hUAB, dilennet eo bet, ha rener "Nantes-Ecologie", — ne viot ket souezhet enta mard eo ivez rener "Alternantes". Bez' ez eus, en diwezh, daourummad kevredigezhioù war "Alternantes"; diouzh un tu ar C'hUAB ha "Nantes-Ecologie", a zo perc'henn war ar skingomz, ha



Sonerezh breizhek-rik ha peurhengounel a vez klevet e-pad "Kanevedenn"?

Dibabet hon eus skignañ sonerezh liesseurt, da lavaret eo, an hanter a sonerezh keltiek hag an hanter all a sonerezh n'eo ket keltiek tamm ebet. Dre ma vez skignet sonerezh keltiek ha sonerezh folk a-hed ar sizhun, arabat eo deomp lakaat sonerezh ar vro hepken e-pad an abadenn. Anavezout a ran brezhonegerien hag a zispilj dezho ar sonerezh breizhek pe hengounel. Bez' e c'hell unan bezañ ur brezhoneger hep mont d'ar festoù-noz. Ar yezh a zo ur benveg evit mont e darempred gant an dud, evit skignañ mennozhioù, n'eo ket hepken un danvez sevenadurel... Bez' ez eo ivez, evel just, en un doare, peogwir emañ ar brezhoneg hiziv en arvar, un dra eo a c'hellomp difenn, hag eo ret deomp difenn.

Met ar brezhoneg, evel forzh peseurt yezh, a zo ivez ur benveg evit skignañ mennozhioù, evit kaout plijadur... Bez' e c'hellomp komz brezhoneg war ar straed, e pep lec'h ha n'eo ket hepken e-pad darvoudoù 'zo, gant tud 'zo. N'eo ket ar brezhoneg ur ghetto, dav eo digeriñ ar yezh-se. Talvoudegezh hor yezh a zo par d'ar yezhoù all. Yezh bemdez gant sonerezh bemdez enta. Tud zo n'int ket evit kompren an dra-se ivez. Un afer bersonel eo ar sonerezh hag ar yezh a zo un afer hollek, un afer a gevredigezh. Arabat meskañ an daou dra.

Pet den, en diwezh, a zo o labourat evit "Alternantes"?

Pet den a zo o labourat? Daou rumm a gaver. Bez' emañ an abadennoù a vez kaset da benn gant ar c'hevredigezhioù, daou pe dri den evit pep abadenn peurliesañ. E-pad mareadoù zo, e skignomp sonerezh dibaouez, peogwir n'hellomp ket mont kuit evel-se hag embann: "Goude merenn e vo staget dezhi endro!" Evit-se eo ret goprañ tud, objektourien pe TUCed, evit lakaat ar pladennoù da drefi, pe respont gant ar pellgomz, hag ivez evit ar c'heleier, evit lenn, dastum ar c'heleier, o c'hempenn, h.a. N'eo ket gant ar radio e vezont gopret, avat, met gant ar Stad.

Daoust hag emañ "Alternantes" e soñj astenn e dachenn?
Bez' e vo savet ur peul-skignañ all e Sant Stefan Menez Lug, e kornôg Naoned. Lod eus an abadennoù,

AR C'HOEF HAG AN TCHADOR

Ar relijionoù o deus klasket a-viskoazh levezonañ buhez ar gevredigezh ha pouezañ war ar veli a-benn gwaskañ an dud ha sparlañ o spredoù. Stourm a-enep dezho o deus ranket ober ar pobloù evit dont a-benn da ziazezañ ur gevredigezh lik hag ar frankiz a goustiañs. E Bro-C'hall e voe votet lezenn an dispartit etre ar Stad hag an Iliz e 1905 ouzhpenn tregont vloaz goude merzherint dispac'herien ar Gumun. Met pet gwech eo bet torret ha didorret gant ar gilstourmerien abaoe ar mare-se? Ar reuz a oa bet savet dindan ar gouarnamant a gleiz end-ro

d'ar skolioù kristen a ziskouez splann pegen talvoudus e chom stourm kevredigezhioù evel ar Mennoz Dizalc'h da skouer rak ne c'heller ket kaout fiziñs e strolladoù an tu kleiz evit enebañ ouzh an Ilizoù pa vez an heol o parañ war o darempredoùadbrugarez d'argatoliked "sokial" sur a-walc'h hag a zo deut a-benn d'en em silañ e-barzh emsav ar vicherourien.

Stadoù diazezet war ar relijion a gaver c'hoazh siwaz er bed a-vremañ, paneveken an Iran hag e ayatollahed, mollahed he tud lazhet e-leizh. Ar c'hreafsoù bras, ar



goude bezañ bet enrollet, a vez adskignet gant ur skingomz eus Sant-Nazer. Klevet e vez "Alternantes", hiziv, hiziv e Naoned dre vras, hag en ul lodenn eus bro Raec. Hogen arabat ankounac'haat e vez emañ an hanter eus poblañs bro

Naoned, un hanter vilion a annezidi. Pennad-kaoz enrollet en Orvez, d'ar 25 a viz Genver 1988, deiz sant Konhouarn. Alternantes 19 straed Nancy 44300 Naoned

gristeniezh hag an islamaelzh a zo boutin o mennozhioù war ar gwaskerezh a-enep d'ar maouezed. Arabat disoñjal da skouer emzalc'h ar pab e-keñver an diforc'hiñ hag an hilastaliñ. En Iran e lak an ayatollahed an urzh da ren e-barzh ar c'houladoù en ur mod eun-tre: ret eo heuliañ Lezenn an Islam. Diouti e tenne dija Lezenn-diazez an Iran pa c'hourc'hemenne ar shah: ar vaouez a zo ur c'hrouadur disteroe'h hag a rank sentiñ ouzh ar gwaz. Hervez ar rann 1113 eus ar gwirioù sivil e c'hell ar gwaz freuzañ e zimeziñ pa'n deus c'hoant dre dredeog zoken hag anez e gemenn d'e wreg mar kar. Roet eo bet ar gwir da votiñ d'ar maouezed met pa n'eus ket e gwirionez eus an demokratiezh parlamantel penaos e c'hellfent int eta kemer perzh er vuhez politikel?

Stourm o doa graet merc'hed an Iran, gwisket ganto an tchador 'enep diktatouriezh ar shah; kemer perzh o doa graet ivez ar micherorezed hag an implijadez en harzoù-labour a vorzas ar vro en he fezh. Miliadoù anezho a nac'he lezenn an islam hag ar ret gwiskañ an tchador. Koulskoude evit stourm a-gevret gant maouezed an islam, evit diskouez splann o c'hengred ganto ha mirout na veze dizunvanet o emsav, o doa-int divizet gwiskañ un tchador e-doug ar manifestadoù. En deiz a hiziv e soñjont sur a-walc'h int bet tapet brav!

Ur wech deuet e penn ar vro, aaudi ar republik islamael a oa komañset da waskañ ar bobl, diduuez. Setu ret da zispac'herien zo dibikouzañ o daoulagad! Ar maouezed a ranke gwiskañ an tchador e burevioù ar velestradurezh; ha miliadoù anezho o huchal: "N'eo ket bet kaset an dispac'h war-raok ganomp-ni d'e lakaat da vont war e gil." Ha stourmerien an islam o choul: "An tchador peotramant un taol war no penn!" Hag en ur dostaat ouzh ar merc'hed o vanifestiñ e tiskouezent dezho o hiroulig en ur lavarout: "Setu ar Frankiz evidoc'h c'hwit." An oad dimeziñ a zo bet digaset eus 18 vloaz d'an oad ma vez stummet ar merc'hed. Gwech dimezet ne c'hellont ket mui studiañ. N'eus ket moaten dezho mui mont da varner, peogwir n'int ket "barrek" a-walc'h da varn 'vel ma oar an holl evel-just! Er bloavezh 1979 e oa bet lakaet harz d'ar magdioù 'barzh al labouradoù hag ar mererezhioù a-

benn delc'her ar maouezed en o zi.

Embann a ra fraezh lezenn an islam distervezh ar maouezed. Treec'h dezho eo ar wazed a-drugarez d'an donezonoù o deus bet digant Doue. Lezenn ar C'horan a sell ouzh ar maouezed evel ouzh hanter tud. Testenioù div vaouez a dalv kement hag hini ur gwaz, lodenn madoù div vaouez kement hag an hanter eus hini ur gwaz. Ur gwaz en deus droad da gaout peder maouez war un dro ha meur a hini c'hoazh ur wech an amzer. Ar briedelezh dibad dre ur c'hontrad o talvezout e-doug un nebeud eurvezhoù, devezhoù pe hiroc'h a-wechoù, a aotre, ur wech torret, da lemel kuit o gwirioù digant ar vamm hag he bugale. Ar rangerioù ma veze enno ar gisti a zo bet lakaet an tan warno ha

distrujet int bet gant an tourterien evit stourm a-enep an hudurniezh. En deiz a hiziv, meur a intañvez soudard a asant bezañ an deirvet pe oedervet gwreg, pe gwreg dibad zoken, evit dont a-benn da grakveañ. Bremañ eo ret gwiskañ an dilhad islamael. Kement fiseadenn dister a vez kastizet kriz: dre an toull-bac'h, taolioù skourjez

pe ur c'hamp labour.

Ma bez lazhet ur vaouez gant ur gwaz, hemañ n'en do ken da bacañ an hanter eus ar priz divizet gant ar *fajhih* (un den uhel e garg er relijion) evit buhez ur gwaz. Labezadur an avoultrerezh a zo bet lakaet da dalvezout en-dro. Douaret e vez ar vaouez betek he bruched hag ur vandennad hezholahed en-dro dezhi a sko mein outi, reoù vihan a-walc'h anezho evit na varvfe ket re vuan met peadra evit ma vefe dispennet he c'horf memes tra. Hag e-keit-se ne reont ken nemet blejal: "Bras eo Allah! Saludomp Mohamed hag e wärlerc'hidi!" betek ma vefe marv-miok an hini "gablus". Er c'helaouennoù e vo kontet penaos 'z eus bet kastizet ul loupenh ha mat pell zo! Miliadoù a vaouezed en ioull-bac'h a zo bremañ hag e kendalc'h ar bobl da stourm koulskoude.

Pellik-mat eta e oamp eus hor bro-ni ha lod a gavo dezho hep mar ebet eo disheñvel-krenn an traoù amañ. Dre chafis, ya, evit ar mare, met arabat disoñjal memes tra e oa bet rediet an Iliz katolik da vont war he c'hil e-keñver an deskadurezh lik da skouer. C'hoant bras avat a sav dezhi

TIEZ HOR BRO



Sevel un ti a zo bet digarez din da sankañ ma fri en un nebeud katalogoù. Dav eo dibab ha kement a zo da zibab! Souezhet a-walc'h oan bet é welet anvioù brezhonek ar un darn vat anezhe, pe na oa ket anv an embregerezh he-unan, *Ty Breiz*, *Da viken*, *Pavillons Ty-Mor* hag arall. Ha meur a di kimmiget geté a zoug un anv ag hor bro-ni. En tu 'rall d'ar re gwisket get ur brezhoneg pemdez: *Penn Park*, *Kastell Mor*, *Ti Bihan* (skrivet get un "y" evit ober egzotikoc'h moarvat) e vez kavet lod arall badezet cheu-c'hoc'h: n'eus ket bet doujñs o lakaat "Ana", "Arduina", "Gwen-va"; tregerniñ a raio kleier hon drouizet darguzh pa glevint an doare!

Un den hag a zo pell da vout sot peogwir emañ rener *Al Lanv* a lâre din e veze kavet kement 'rall

ar marc'had ar siminalioù. N'eo ket e kas kement-mañ da bell, n'eo ket e temn da vras evit amzer da zont hor yezh hag hor bro met koulz eo atav, ha plijadur a ra d'an nen, kavout brezhoneg e-lec'h ma c'hellazec'h kavout gallec. Marse ne vehe ket un dra fall teurel ur sell a-dostoc'h ha klask muioc'h ar peseurt tachennoù kenwerzh e kaver brezhoneg. Hag evit pe abeg ("pe evit abeg") a lâre bugale disleksik ar grenmerer, aze e vehe ret goulnet get ar renierien anezhe.

Setu c'hoazh kavet din an tu da vevetaat ha da enorataet mod-kozh: Bevet ar brezhoneg en armerzh, enor d'ar re a laka brezhoneg en o c'hatalogoù!

dont en-dro da vezañ mestrez ar gevredigezh pe harp ar veli. Klask a ra diskouez d'an dud he deus cheñchet penn-da-benn ha ret e vije krediñ kement-se: un akt a feiz 'benn ar fin. Ur bern kristenien oberiant ha difraeus a zo deuet a-benn d'en em silañ e-barzh ar c'hevredigezhioù, ar sindikajoù, ar strolladoù politikel, a glez hag ul labour aketus a reont e diabarzh evit stourm a-enep an danvezouriezh hag evit ledañ kelennadurezh sokial an Iliz. Ar pab e-unan he lavar: "An enebour kentañ eo an dizouegezh." Ha warlerc'hiad Pio XI ha Pio XII a embann e kas nac'hidigezh Doue d'an nazism. Biskoazh kement-all! Piv en doa sinet an emglev gant Hitler e 1933

ha piv a oa ar penn-stad kentañ oc'h anavezout ar faskouriezh? Petra a c'heller soñjal eus an eskibien a vro Alamagn bodet e Fulda e miz Eost 1936 o tiskleriañ d'an holl: "An Iliz Katolik a bed stard bennozh an Neñv war oberenn ar Führer" hag o veuliñ war oberenn ar Führer 1938 en ur brezegenn echuet gant "Heil Hitler"? Hag e bro Spagn, piv a vennige armeoù Franco? O pilpouzerezh divent an dud a iliz!

An eskibien a Vro-C'hall koulz hag an tiegezhioù kristen o deus goulennet groñs nevez zo ma vije adlakaet da dalvezout an deskadurezh kristen e-barzh ar skolioù prevez. Sklaeroc'h e vo an traoù bremañ ha ne vo ket kaoz mui eus ledanded spred ar skolioù katolik emichañs!

Lod a vez oc'h huñvreal en ur Stad breizhat ha kristen; kemeromp da skouer niverenn 236-237 *Al Liamm* 'lec'h ma kaver troidigezh ur skrid gant Saunders Lewis, ar skrivagner meur kembreat ha kristen. Displegan a ra deomp an troer perak en deus sipet e spred en danvez-se "degas da soñj da ensaverien hon amzer, ha da stourmerien *Diwan*, lakaomp, emañ diazezet berzh-mat o embregadur war startijenn un ensavadur evel an tiegezh." Betek-henn n'eus ket peadra da skrijañ gant an doñjer met pa'z eer pelloc'h e korf ar pennad koulskoude ez eus disfiziañs da gaout. Tufañ a ra an oberour e gasoni ouz al laikelzh, an deskadurezh digoust, ouz ar gwellaennoù war dachenn ar yec'hed publik. Ar "Sécu", setu un enebour bras ouzhpenn gouest da zispartiañ an dud eus Doue hollvadelezhus hag

e vevelien. Aze e weler ar pezh a vefe ur gevredigezh diazezet war gelennadurezh an Iliz: ur giladeg diwar war-zu ar Grennamzer pe an naontekvet kantved da vihanañ, pezh a rofe tro da "Ragevezh-Doue" da adc'hounit tachennoù ledan kollet gant e rastellerien. Hag evel-just e kaver ur poz diwar-benn an Unvaniezh Soviedel da anoueañ ar sokialouriezh. Setu n'eo ket diaesoc'h dibab etre an diktaturezh soviedel hag hini an Iliz eget kavout gwelloc'h bezañ krouget e-lec'h bezañ dibennet. N'eus ket keal ganin da reiñ meuleudioù da aduidi ar sokialouriezh a-berzh Stad met



ADKOUMANANTIT E POENT

30

memes tra e karfen gouzout petra 'zo da rebech d'an dra-mañ: "N'eus ket bet graet diforc'h ebet (en Unvaniezh Soviedel) etre gwaz ha maouez dirak al lezenn". Nemet e vefe gwelloc'h e broioù zo evel an Iran evel m'hon eus gwelet uheloc'hik.

Daoust hag-en e ranker kompren ez eo digristenidigezh ar gevredigezh kudenn hag afer *Diwan*? Aze emañ an dalc'h: e Breizh koulz hag e lec'h all e rank binim ar relijion kontammañ spred an dud, hini ar vugale da gentañ hag hini ar vr ras goude-se. Lakaomp ne welfed er mennozhioù-se nemet "broadelouriezh klasel" (Paskal ar Marc'heg, *Al Lanv* Nnn.38) e c'heller koulskoude goulenn ouzhor an unan petra oa soñj an troer: kanmeuliñ savidigezh ur Stad kristen e Breizh? Adsavidigezh Dugelezh Breizh? Me 'garfe a-walc'h n'o defe ket graet ar mennozhioù-se nemet koshaat ken kilstourmus e oant e 1930 evel en deiz a hiziv; hag-en e vefe ur gevredigezh diazezet war ar c'hreafsoù relijiel ur skouer d'ar stourmerien a-vremañ? Ar feiz kristen n'eus ket bet anezhi a-viskoazh war an tamm douar-mañ ha ne c'heller ket asantiñ d'ar c'hevataladur-mañ, sevenadur Breizh = feiz kristen. N'eo ket dav d'hor c'henvroad kristen en deus sammet war e zivskoaz kroaz ar brezhonekadur arnevez koll e esperañs: ra gemero ur billed US\$ hag e welo sked e uhelvennad war c'horre: "In God we trust" (Fiziout a reomp en Doue), pe ma kav gwelloc'h ur blakenn gouriz istorel-meurbet: hini soudarded ar Reich: "Gott mit uns" (Doue ganeomp). Pep hini 'zo dieub d'ober e choaz evel-just met a-drugarez da reolennoù na vefe ket doujet outo en ur gevredigezh kristen. Dalc'homp soñj eus komzoù Louis Veillot, ur c'hazetenner "tremenezial" ha kloereler en naontekvet kantved: "Pa'z on an hini gwanañ e c'houlennan ar Frankiz diganeoc'h peogwir eo ho penreolenn deoc'h, met, pa'z on-me an hini kreñvañ avat, e laman anezhi diganeoc'h peogwir eo ma fenreolenn din."

Deomp-ni da stourm a-enep an diogelourien eus a bep tu, tud a Iliz pe avielourien sant Marx! Bec'h de'i evit ur gevredigezh lik hep stadoù na renkadoù!

PÉRIG KOF-RUZ

AN DISPAC'H BRAS E-TOUEZ AL LOENED GOUEZ

Bez' ez eus ul lezenn a bouez e ranker doujañ out: an disterañ kemm er c'hempouez naturel a zegas buan a-walc'h ur c'hemm e buhez mab-den. Kemeromp da skouer istor raniged bro India. Daspugnet e oant bet hogos holl evit frammañ diganto o morzhedoù ken prizet gant begoù lipous ha pinvidik ar bed kornôgel. Ar marc'had a seblante bezañ talvoudus evit annezidi bro India. Goude ur pennadig avat e c'hoarzh glas tud ar vro: ne oa mui an disterañ ranig o piklammat dre ar vro hag an danvezioù kimik strewet war an trevadou ne oant ket evit dont a-benn da lazhañ-an amprevaned o paotat dre ar vro abaoe ma oa aet da get o enebourien naturel. Dav e voe kas raniged all da vro India. N'eo nemet ur skouer etre kant ha kant all.

Ar c'hantved-mañ a zo bet hini ar c'hemmou bras: savadurioù betoñs, tiez e pep lec'h, sanailhoù ha labouradegoù divent o deus kemeret plas ar geunioù, al lenneier hag ar c'hoadoù. Ranket hon eus toullañ naoz ar stêrioù, strad an aberioù evit kaout traezh ha greunvaen. 230 milion a donelloù ar bloaz evit Bro-C'hall nemetken. Kement-se n'eo ket bet graet hep kemm da vat bed ar mor, ar stêrioù.

Ur c'halz eus hol laboused-preizh hag ur bern laboused all a zo o vont da get (ar rasker-melchon da skouer). Al louzoù kimik a zo kiriek d'un darn vat met ar falc'herez vodern implijet gant al labourerien-douar dres da vare an neizhiañ a zeu da zrailhañ an neizhioù dizamant a zo ken gwazh all.

Pep bagas tireoul skuilhet war hon aodoù a zistruj an hanter eus an erved, godedez ha poc'h anig ganet e-pad ar bloaz.

Darn all eus al loened gouez a zo gouest d'en em zibab, da voazañ

ouzn an dud, ouzh o froudennoù; ar c'hudoned da skouer. Greun da zigrouellat a vez roet dezho ingal er c'hêrioù bras. Ur seurt turzhunelled (*Streptopelia decaocto*) o tont eus Bosforos a zo erret er vro war-dro ar bloavezhioù '50. Aloubet eo bet ar vro ganto abaoe. Ar gwelan gris en deus graet kement-all. Bez' e oa

8.000 koublad anezho e 1955, bez' emaint 61.000 bremañ e Bro-C'hall hag e Breizh. Labour vat a ra ar paourkaezh gwelan gris: naetaat 'ra an aodoù en ur zebriñ ar pesked marv, ar c'hagnou hag ar stered-mor a ra kement-all a zistruj e-toez ar c'hregin-mor (kalipez dreist-holl).

Bed an dispign, ar moc'hant-boued, en deus krouet un digempouez biologieg hag ar gwelan gris, leun a intrudu en deus tennet e vad eus an dra-se. Darn eus al laboused-mor-se ganet en Alpoù ne welint biken ar mor! N'o deus ket mui ezhomm eus ar mor evit bevañ, disoñjet ganto blaz ar pioka; gwelloc'h e kavont c'hwezhiñ flier brutgennoù ar Spermed e Brest, da skouer. Bez' ez int laboused spred met lezrek ivez — echu ar beajoù hir ha skuizhus ha bec'h d'al lastez —, sevel a reont o neizhioù e-krec'h an tourioù-uhel ha difenn a reont o zoennoù sikil evel ma raent gwechall evit o zornadoù. Memes tra evit an dridi. Ini-i hag a yae gwechall da c'hoañviñ betek divezeoù bro Varoko, n'eont ket pelloc'h eget ar stêr Loar. 15 milion a dridi a vez ingal e Breizh, 50 pe 100 milion anezho pa zeu o c'hendrievi eus ar reter; 540.000 tonenn boued a ya ganto en ur ober tri miz. Ha bec'h d'ar maiz! Boued a gavont e-pad ar goañv er sanailhoù greun ha mastañs a reont an trevadou e-pad an hañv, 30gr a ya gant pep hini bemdez. Ur gwir walenn! Ar c'haoc'h hag an traozh a laoskont war o lerc'h a zo noazhus evit ar gwez. Ur c'halz eus al laboused a vev war tiriennnoù ha tachennoù an aerborzhioù ha kampoù an arme, eno ne vez ket skuilhet trempl kimik (an arme ne saotfe ket?). An trempl kimik n'eo ket un dra fall evit an holl: amprevaned zo a baota hardizh o vezañ m'eo bet



31

lazhet o freizherien (logotaerien, sparfelled glas...).

Emañ bed an natur o cheñch da vat. Louarned, falc'huned, kaerelled, kaouenned, heizezed a vev bremañ tost d'ar c'hêrioù bras ha memes e kreiz-kêr, kemmet ganto da vat o doareoù bevañ hag o boazioù. Tud ar c'hêrioù a c'hellfe o zrugarekaat rak naetaat a reont ar c'hêrioù. Tro-dro d'ar c'hêrioù bras ez eus kantadoù a louarned o vevañ. Int-i hag a chasee

kentoc'h e-pad an deiz a zeu bremañ e-pad an noz da gerc'hat o boued er podoù-lastez. Ur gwir baradoz evito! Lojet ha maget e vezont hag ouzhpenn-se n'eus den ebet evit chasal anezho. N'int ket mui spontidik evel kent, ha n'eo ket ral gwelet laboused zo oc'h en em barat dirak o holl. O! mores, o! tempores! krog eo ar moulic'hi da ganañ e-pad an noz en-askont da gleuzerioù kêr, hag a zo souezhusoc'h, da ganañ war

un ton disheñvel eus hini moulic'hi ar maezioù (kentoniët gant tousmac'h ar stradoù).

An costig-bailh hag ar falc'hun a implij bremañ ar savadurioù mein evit neizhiañ. Un "ersatz" tornaod a-wechall. Bez' ez eo an tourioù betons menezioù evito, ne reont diforc'he bet ken.

En em soñjet eo ar skiantourien war gresk ar stered-mor, gwir breizherien an donvor: meskl, kokez ha kalipez a ya ganto a vil vern. Muioc'h eget 500 tonenn anezho a gaver e bae Douarnenez (250.000 m²). Moarvat ez eo bet re stank ar beskerez war unan eus ar pesked a zebre ar stered-mor. Peseurit pesk avat, den ne oar.

Kresket eo ivez niver ar gerc'heized abaoe m'eo difennet o chasal. E pep aber e weler anezho bremañ.

Al loened gouez kaset gant an dud o-unan a ra ar muiañ a zistruj. Ar



c'hazh-koad asiat en Antibeza da skouer. Darn eus al loened a zo deuet o-unan gant an tren, ar vag, an hentou, ar pontoù. Deuet eo ar c'hrank sinaat betek ennomp stag ouzh kouc'h ul lestr bennak. Gwelet eo bet evit ar wech kentañ e bro Alamagn e 1912, e pep lec'h e vez kavet bremañ. E 1912 e veze desavet razhed evit o feur met ne oa ket gwall efedus o vezañ ma ne raent ket niver klozet e kaoedoù, laosket int bet da vont en natur! It ha paotit!! Darn all eus ar razhed a oa pignet war ar bigi war-bouez o funioù. 8 milion anezho a gaver e Paris. Naetaat a reont kanoù-distrouilh ar gêr vras. Paneveto e vijent bet stanket pell zo, met a bep seurt klefvedoù a zegasont ivez. Emañ ar c'hi "viverin", ul loen eus broioù ar sav-heol, o tоста tamm-ha-tamm eus Breizh. Ar visioned amerikan,

desavet evit o feur, a zo un danjer all. Un darn anezho a zo tec'het en natur goude ar gorventenn he deus skubet hor bro. Kaset eo bet gant chasourien ar c'honikl amerikan da Europa. Bez' ez eo ul loen gwall gizidik d'ar c'hleñvedoù kontammas evit an dud.

Emañ ar skiantourien o studiañ pizh emzalc'h nevez al loened gouez. Gwelout peseurt re a zo o vont da get ha peseurt re a zo o vont da gemer o flas. Kontet ez eus bet 5 seurt mammeged nevez, 12 seurt laboused hag ur seurt naered nevez e Bro-C'hall nemetken.

Liammet start eo dazont al loened gouez ouzh hon hini. Bezomp fur, doujomp d'an natur!

PENN-KIL-HA-BLUES
Ar sonerezh black? A-du!

Kouezhet eo ar vuzisianed afrikan etre daouarn ar varc'hadourien. Steuziet da vat ar gizioù diwezhañ, ar reggae gant marv Marley hag ar punk gant emlath Sid Vicious, dav oa d'ar brouderien kavout sonioù, tonioù (ha pennoù, 'giz' vez lavaret) nevez a-benn leuniañ adarre o c'hofroù-bank. Ha setu kavet ganto ar wazhenn afrikan. Gwir eo ne chome ket kalz tra all: an Eskimoed, marteze? Mat e vefe goullenn aii Polémique Victor.

Betek-hen e oa brudet tud evel Linton Kwesi Johnson, a orin jamaikan, e London dreist-holl. Deut e oa war-lerc'h Marley gant ur sonerezh tost e ritm ouzh hini ar reggae met gant komzoù salmet, "sloganet", ha n'eo ket bet kanet: "dub poetry" a veze graet eus an doare-se. (Bez' ez eo, ouzhpenn-se, L.K. Johnson, ur barzh brudet e Breizh-Veur hag engouestlet e stourm ar vinorelezh jamaikan), King Sunny Ade ha Fela o deus bet ivez o frantadoù brud evit abegoù disheñvel. Ar wech-mañ, avat, n'eo ket van 'ra ar brouderien da lakaat war ar marc'had sonerezh "afro", (pe "afro zouk", evit bezañ resis) ha kement-se n'eo ket evit displeijout deomp. Evit gouñit stourm ar werzh en deus pep "ti" bras e "varc'h-ambilh"-en.

Istand Records (Bro-Saoz), c'hwitet gantañ ar strollad Kassav, en deus sonet gant ar Malian Salif Keita, lesanvet "paotr e vouezh aour", en abeg d'e bladenn ziwzezhaf Soro. Ur c'hontrad evit c'hwec'h

bladenn ez eo. Bez' en do £250.000 evit an hini gentañ. Ar pal: gouñit ha trec'hiñ er Stadoù-Unanet. Tra all!! EMI, kollet ganto Salif Keita, o deus lakaet Alpha Blondy (a oa ganto abaoe 1984) da gemer e blas, hag ur menoz mat eo bet: enoriñ, meuliñ, azeulañ, kehelañ 'ra Houphouët-Boigny. Un doue eo evitañ... un doue, petra 'skrivant Doue eo! (gw. "Jah Houphouët" war "Apartheid is Nazism" - 1985). War e bladenn ziwzezhaf, "Revolution", ez eus un tu tost da vat gouestlet d'ar brezegenn gant Houphouët (displegañ 'ra e stourm evit krouiñ an R.D.A., Rassemblement Démocratique Africain) eilet gant ur ritm reggae. Surrealist! Sony (ex CBS) en deus dibabet Kassav evit mont war dachenn an emgann.

Oberiet gant ar gitarour Jacob Desvarieux, "Vini Pou", bladenn gentañ Kassav e ti Sony 'vo klevet warni Phil Collins ouzh an taboulinoù, ha kalz a dud ken brudet all.

Virgin en deus diskoachet Youssou N'Dour ha roet dezhañ an tu da embann ur bladenn graet "mega" anezhi evit ar c'houlz. A-benn miz pe zaou e teuo er-maez. Paotr Dakar a gavo, eñ, sikour Peter Gabriel...

A-benn nebeut 'ta e vo beuzet gwagennoù ar radio ha skrammoù an tele gant an arzoerien afrikan. Trec'h an afro-zouk e vo... betek ma vo kavet kezeg-samm all gant an dastumerien milionoù.

GONERI AP RIORI

NATUR

E Plougastell Daoulaz ez eus bet krouet ul labouradeg nevez evit desevel... fibu. Ur seurt ispisial: Encasia founosa. Bez' ez eo ar fibuenn-mañ ul lazhe-preved efedus. Distruj a ra ar c'hwen en ur zozvñ he vñe e biskoullenn ar c'hwen.

2 pe 3 milion anezho a zo deuet 'maez al labouradeg iskis-se, krouet gant an I.N.R.A.

Implij amprevaned evit distruj amprevaned all n'eo ket un ijinadenn nevez. 2.000 bloaz zo ez implije Sinaiz buoc'higed-dour evit distruj ar c'hwen.

Grit un taol-arnod finet

Dibabit ur pardaez-noz dioul. Dav deoc'h kaout un amprevan askellek bennak o fraotval en-dro deoc'h (c'hwil sant Yann da skouer). Ur gador-vrec'h. Lakait ur werenn gristal da seniñ gant ho piz gleb.

BECH D'AR
C'HWEN-GWEZ



TUDUAL HUON



lazherezh

An deiz all, ganin ur morzhol war ma c'heñ, em boa kejet gant Mari Loñs* o kerzhout betek ennon eus ar vosez, ha lavaret dezhi krenn ha krak:

"Graet ez eus bet ur gammed war-raok d'am meno, gant spered an neb a gav dezhañ ez eo an naziellezh ur wallidigezh eus ar relijion."**

Divarc'het un tammig e rankas chom a-sav-sonn ha sellout ouzhin gant daoulagad ejen... Ha me ganti adarre:

"A-hend-all, piv ac'hanomp n'eo ket bet desavet war-bouez un ideologiezh bennak?***

A-barzh nemeur, dinc'het, e reas pakotùñ d'he blev krak hag en em

c'houlenn outi hec'h-unan ha ne ome ket paotr Marsel kig ha gwad oc'h ober goap anezhi a-raok ar gouesperoù. Ha, gouzout mat a ra:

Paul Gornek

A zo goudis ar merc'had

A ro skouarn dezhañ

A-zivout Yann-Vari Perrot da skouer, hennezh a oa manet feal d'e wiskamant betek e huanadenn diwezhañ, evit e galon da vezañ manet war he zu mat... Ken gwir eo pa soñjer ar pezh a vez lavaret gant an dud oc'h ober goap eus an dud:

Ar Pluñv a ra al Labous

Dezhañ avat ne oa ket ret da vezañ gwisket evit gouzout peseurt danvez a oa ennañ. Ruz e oa eta an dorn a wiskas war ar blunenn, piv a lavaro biken ha n'edo ket ar mennozh e gor dindan kabell un eskob bennak hep gouzout da zen? Rak, n'eo ket brabafsiñ a ra ar Vretoned, ha:

Diouz ar Red

N'eus nemet ar Remed***

Gouzout a ris diouzhtu e oa aet ma ger ganti pa lavaras din en ur griadenn:

"'Na-se zo l'akameractivizi!"

"Ha! Ha!..."

PAOTR CHIL

* Diwar "Gouesperoù diwezhañ Mari Loñs" gant Gwendal Denez, Dastumad «Skids Mouladurioù Hor Yezh», 1987 [Gant aotre hegarat an oberour]

** Bremañ, niverenn miz Du 1987

*** Bremañ, miz Du 1987. Tamallet a embann.

N'EUS FORZH PETRA!



nouspet strizhkredenn all lakaet gant an Iliz da Wirionez. Ar pennadig a lennoc'h izelloc'h a ro un tafva eus an doare a veze implijet gant ar veleien evit "stummañ" speredoù an dud (e saozneg e vefe graet gant "brainwashing") ha sankañ en o fennoù menozioù (?) kilstourmer ha droch. Kaer e vo lavarout eo bet skrivet kement-se e dibenn ar bloavezhioù '30 ha n'o doa ket c'hoazh izili ar *women's lib* lakaet framm ar gevredigezh hengounel da darzhañ ez eo gwall ziaes kavout an disterañ arguzenn evit difenn seurt skridoù.

«D'ar baotred yaouank a zo o klask ur vaouez.

M'ho peus kavet ur plac'h yaouank hag a blij deoc'h, a-raok dimeziñ ganti, it da sellout outi o kignat patatez. Ma kign anezho tev-tev n'eo nemet un dispignerez.

Ma ne denn ket, gant beg ar gontell, ar pikoù du a vez alies er patatez, neuze n'eo nemet ul labaskenn, pe, ma kavet gwelloc'h, ur feneantez.

Ma ne walc'h ar patatez nemet ur wech hepken, n'eo nemet ul loudourenn.

Ma lako ganto, evit o foazhañ, kalz re a amann n'eo nemet ul lipouzenn. Na zimeziñ ket ganti.

Keuz ho pefe.»

(Ar Vuhez Kristen, Nnn.7, Gouere 1937)

Setu, ma fell deoc'h beajiñ, lennit *Ar Vuhez Kristen*, ur gelaouenn bet embannet e Rosko gant an tad Medard. Diwallit avat, ur re-gofad a lako ac'hanoc'h da zislonkañ.

FAÑCH JERANIOM

arguzennoù ha diskleriadurioù evel-se ez eur deut a-benn da grouiñ "yezhoù bras" ha "yezhoù bihan", "yezhoù lennegezh", "yezhoù diheverez" hag all. N'eus yezh ebet o vont en-dro gant tregont ger... o tennañ holl d'ar goadur-boued, ouzhpenn-sel! Emichañs, pa n'emañ ket ar bobl afrikan-se o tebriñ, e kerzh an dud e-giz babouzed hag e komzont yezh ar marmouzien, rak ur "yezh" o deus, int... N'eo ket souezhus e vefe bet graet an diskleriadur gouennelour-se gant ur c'hozh trevadenn.


Beajiñ a fell deoc'h? Ur veaj a ginnigomp deoc'h e strad ar baourentez spered, ar pipouzerzh, ar falskredennoù, al lidoù-hud ha

Klemm a ra unan eus al lennerien, e-barzh *Le Monde* (8/9.1.88), en abeg d'an abaden *Apostrophes* a oa bet gouestlet d'al levrioù-kegin. Setu pezh a c'heller lenn e "kof" al lizher: «Un gouverneur de notre empire colonial en Afrique noire, peu après la dernière guerre, me disait que l'une des ethnies qu'il gouvernait ne possédait comme langue qu'un vocabulaire de trente-deux mots, tous consacrés au tube digestif! C'est à lui que j'ai pensé vendredi!»


Ma'z eus ul live mann da speredegzhi an den, neuze ez eo tost tizhet amañ. Tost, rak emeur c'hoazh dindan al live mann. Gant

PSI KOZH-NOE

EMAN AR VOTADEGOÙ O TOSTAAT




34



Tudu

al lanv



Divizet hon eus digeriñ ur rann lennegezh reoliek e-barzh *Al Lanv*. Betek-hen e veze embannet un danevell («Danevell Al Lanv») hag un toullad barzhonegoù gwech ha gwech all. E soñj emaoamp bremañ plediñ gant an danvez lennegezh e-barzh kement niverenn a zeuio er-maez: danevelloù, barzhonegoù, troidigezhioù hag all, met ivez burutellañ levrioù... Un doare e vo, a soñj deomp, da vroudañ an dud da skrivañ hag ivez da zegas lennerien ouzhpenn d'ar gelaouenn daoust d'ar speredoù strizh ha d'ar c'halonoù sech a garfe e tigreskfe niver koumananterien *Al Lanv*... evit mad ha dazont ar brezhoneg, moarvat?! Deut mat eo an neb a blijfe dezhañ kemer perzh. Dav dezhañ/dezhi kas (h)e skridoù skrивerezet pe skrivet brav ga'n dorn da: Gwendal Denez, 25bis bd Liberté 35000 Roazhon. Spi hon eus e teuimp a-benn da sevel ul labour a-zoare ha talvoudus.

35

AL LANV

JAKEZ RIOU

SKUIZHDER

Perak genel, Doue, peogwir n'eo ar vuhez
Nemet ul luc'hedenn o tremen war ar bed ;
Peogwir n'eo nemet tristedigezh,
Ha teñvaljenn hag anken?

Perak e valeomp dindan an oabl garv,
War hentoù leun a spern, i ruziet gant hor
[gwad?

Yaouank-flamm on, koulskoude : c'hoazh ne 'm
[eus baleet

Nemet 'pad ugent vloaz, war ribl teñval ar bed,
Hag e-pad 'mañ an heol o par' d'ar yaouankiz,
Warnon ne gouezh nemet koulmoul an arnev...

'Vel ar re all on mab dit, o Doue!
Koulskoude,

Hep ur sell a druez, va-unan, hep diskiuzh,
[hep harp d'am izili brevet,
Dic'hoanag em c'halon, va ene ankeniet,
Dindan un oabl izel en un noz peurbadus,
Kreiz an arnev, ne glevan nemet mouezh
[skiltrus

Al labous-mor hag hirvoud an avel.

'Vel ho mibien, Doue, 'tfeñval bezañ laouen,
Evel ar re a zo dirazoc'h daoulinet,
laouen evel ar re a bok d'ho treid toulllet,
Hag a sko d'o feultrin gant mein kalet an
[hent...

...Ha tristedigezh zo war va zal;
Va ene zo leun a c'hlac'har,
Ha kaer em eus sellout war-zu an neñvoù dall,
'Dreuz ar goumoulenn du, steredenn 'bet ne bar.

Ar goabrenn a ziskenn mui-oc'h-mui,
Prestik, tost ouzh va fenn.
Va beaj 'zlefe bezañ ken hir c'hoazh 'barzh
[echuiñ,
Ha dindanon, 'tigor 'vel un islonk divent!...

War ar bed 'vezin bet 'vel un evn o tremen!...
Koun a zeu din bremañ eus an amzer eürus,
Pa bare din an heol arc'hantet.
Ar bed n'am sponte ket gant e zeizioù poanius,
Hag ar gouzañvoù 'oa ar brasañ levenez.
Pa gouezhen d'an douar, diouzhtu ur mignon



Am save gant douter, a serre va goului...
Met, hiziv, mar deufe ur mignon d'am frealziñ,
Re ziwezhat 'vefe: va gouluiù zo re zon,
Ha va c'halon bemdez a wado hep ehan,
Betek deiz eürus va zremenvan.

O, amzer gwechall!... O, huñvre dudiüs,
Hag a lugerne dec'h, hag hiziv pell ouzhin!
O, kouent santel, mogerioù kozh, sioulded
[peurbadus,

Daoust na oa 'met un huñvre an eurvad a rejont
[din?

O, kouent santel, dirazon, 'vel ur skeud, chom
[bepred,

Evit am frealziñ, pa gouezhin war an hent.
Mes, 'lec'h bezañ laouen, perak, leun a anken,
E ouelan 'vel ur bugel, war hent kalet ar bed?
Perak c'houzañv va c'halon peurfreuzet
Gant un taol laonenn?

Klevout 'ran an arnev o krozal war ar mor,
Ra savo! Ra yudo! Gant va divrec'h digor,
Laouen hen resevin.

Bemdez, gant ar varrenn, bugelig an Arvor
War-zu glannoù dianvez, 'yelo gant ar bezhin.
Kouent sakr, lec'h ar repoz,

Ganit ne c'houlennan nemet ur sklérjenn,
'Vel bannoù un tour-tan e-kreiz ur mor
[direizh,

'Vit ma welin, war diwez va hent,
'Pignat d'an Neñv, ur Goulou-Deiz!

Nanterre, Kerzu 1919



Troidigezh gant Fulup ar Brondu

JOSE

Ur varzhoneg a vrud vras e bro Vrazil a-bezh, bet troet e
meur a yezh (e galleg gant J.M. Massa eus Skol-Veur
Roazon). Kavet brav oa honnezh ganin, setu m'eo bet riklet
war ar brezhoneg, tamm-ha-tamm, evel ma rikler er
pe'ched.

Petra 'ri José?
Achu eo ar fest
Lazhet eo ar gouloù
Kuit eo an dud
Freskaet eo an noz
Petra 'ri, te?
Te hag a zo hep anv
hag a ra goap eus ar re all
Te hag a ra gwerzennoù
a gar hag a sav da vouezh?
Petra 'ri, José?

Hep maouez emaut
hep karantez emaut
hep prezeg emaut
N'out ket 'vit eviñ mui
N'out ket 'vit fumiñ mui
Evit tufit n'out ket mui
Freskaet eo an noz
N'eo ket deut an deiz

N'eo ket deut ar c'harr-boutin
An utopiezh n'eo ket deut
Hag achuet eo pep tra
Ha tec'het eo pep tra
Ha louedet eo pep tra
Petra 'ri, José?

Petra 'ri, José?
Da gomzoù flour
Da gaouad terzhien
Da yun ha da lonkerezh
Da levraoueg
Da veingleuz aour
Da wiskamant a wer
Da zibellegezh
Da gasoni — Petra 'ri?

Gant an alc'hwez ez torn
E fell dit digor' an nor
N'eus dor ebet.
E fell dit mervel er mor
Nemet ar mor zo hesket
E fell dit mont da v'Minas
Nemet n'eus Minas ebet mui
José, petra 'ri?

Mard e youc'hfes
Mard ec'h hirvoudfes
Mard e soñjfes
VALS VIENNA
Mard e kouskfes
Mard e skuizhfes
Mard e varvfes
Nemet mervel ne rez ket
Kalet out, José!

En da-unan en deñvalded
Evel unan gouez
hep teogoniezh
hep moger dizolo
evit harpiñ
hep marc'h du
hag a dec'h d'an daoulamm
War-raok ez ez, José!
José, davit pelec'h?



GONERI AP RIORI

MONA HA LENA

Run!
run menez-keldreg
run
ur blues evit Mona
hag un all evit Lena
neuze run
run menez-keldreg
run
ur blues evit Lena
hag un all evit Mona
neuze run run run
run menez-keldreg!

WALIZA FUTUNA

DEUS

Deus paotr
arabat chom da leñvañ
dindan an amzer
deus breur
noziñ 'ra bremañ
n'eus den ebet ken
er vered
ha hir eo an hent
deus
dav eo lezel ar re varv
da skubañ o evivor
diouzh ar bed-mañ

deus breur
arabat chom
dindan an amzer

LUIS LLACH
(Troidigezh gant Fulup ar Brondu)

EBREL '74

Ur ganaouenn digant ar c'hanour a gevan ar gwellañ zo abaoe un nebeud bloavezhioù: Lluís Llach. N'eo ket un droidigezh rik evel ma'm eus graet evit "Jose". Klasket em eus en homañ — met chomet on strizh gant ar ster memes tra — lakaat an ton arzekoc'h: lusk ar c'homzoù a van hogozik memes tra.


Paotred, mar gouzit-c'hwî pelec'h e kousk al loargann,
Lavariñ 'ta dezhi
He c'harfen-me a-zevri
Nemet me 'van en emgann.

Paotred, mar gouzit-c'hwî pelec'h 'mañ kev ar vorgan
Eno e-kreiz an tonn
Daveti e karfen mont
Pavevet an emgann.

Ha mar tro da fall ha d'an douar e kouezhan
Dougit holl ma c'hanoù
Hag ur vodad vleuniou
D'an hini a garan
Mard omp trec'h en emgann.
Paotred, mar hiraezhit-c'hwî d'an nevez-hañv
dichadenn
Mont ganeoc'h e vennan
Rak 'vit adkavout e hent
Aet on-me d'an emgann.

Ha mar tro da fall ha d'an douar e kouezhan
Dougit holl ma c'hanoù
Hag ur vodad vleuniou
D'an hini a garan
Mard omp trec'h en emgann

Diwar *Abril 74* Lluís Llach, kanour katalat



38

ALAN BOTREL

« DEN NE DAL DOUR MA DAELOÛ »

"Engelbert Humperdinck."
"Nann, Erwan. Piv eo?"
"Engelbert Humperdinck."
"Perak 'rez goap ouzhin 'vel-se? Lâr din piv eo..."
"Engelbert Humperdinck, lâran dit."
"O, Erwan! 'Vit beure 'oas jentil ha tout ha bremañ out drouk ken ez out. Perak out drouk ganin 'vel-se? Petra 'zo? Petra 'm eus graet...?"
"Mann. 'T eus graet mann."
"Perak 'fell ket dit lâret din piv 'zo 'kanañ 'barzh ar juke-box?"
"Engelbert Humperdinck 'n hini eo, 'lâran dit, gwir eo."
"Gwell 've dit ijinañ anvioù all. Pas anvioù ken droc'h."
"Ma ne gredez ket 't eus ken mont da welet. Goût a rez penaos 'vez graet, hañ? Ul lizherenn hag un niverenn 'zo skrivet war ar mekanik, ruz war du, ha da c'houde 't eus ken klask war ar roll ha pa gavez e ouzout piv 'zo 'kanañ ha petra 'mañ o kanañ."
"Ur sodell 'rez ganin?"
"Ran ket."
"Ma, forzh penaos, ne ran foulre kaer gant ar c'haner amoad-se..."
"Perak e c'houlennez, neuze? Ma, ur banne all 'yel ganin."

Mont a reas en e sav hep goulenn tra diganti, daoust d'he gwerenn bezañ goull ivez. Sellout a rae outañ o tostaat ouzh ar c'hontouer, ouzh e gein ken teñval ha ken mut... Digompren, dispourbell ha gleb he daoulagad.

Paet e vanne gantañ ez eas war-zu ar juke-box, lakaat ur pezh dek *pence* e-barzh ar faoutig ha dont en-dro da choukañ en he c'hichen, hep sellout outi.

Sevel a reas mouezhoù kozh un drompilh hag ul laz-jazz, bet enrollet hanter-kant vloaz a oa.
"A bep seurt 'zo 'barzh ar mekanik, aze."

"Bez 'zo."
"Blazioù a bep seurt 'zo gant an dud ivez. Country, jazz... Emberr 'vo un tamm rock pe folk bennak..."

"Marteze a-walc'h."
"Ha piv 'zo 'kanañ ar wech-mañ?"
"Bix Beiderbecke. Ne gan ket."
"Petra 'ra neuze?"
"C'hwedhiñ 'barzh ur seurt bombard 'met n'eo ket ur bombard."
"Ma. Ur bintad bitter all 'yafe 'walc'h ganin..."
"Ken pell-se emañ ar c'hontouer?"
"Erwan!"
"..."
"Mont a rafen a-walc'h d'ar gêr, da gousket."
"Ken bremaik, neuze."
"Pell e chomi amañ?"
"Da unnek eur, unnek eur hanter 'vez serret an tavarnioù er vro-mañ, goût a rez?"
"..."

Mont a reas en he sav hep goulenn tra digantañ. Ne sellas ket outi o tostaat ouzh ar c'hontouer.

Paet he banne ganti ez eas war-zu ar juke-box, lakaat ur pezh dek *pence* e-barzh ar faoutig ha dont en-dro da choukañ en e gichen hep sellout outañ.

Sevel a reas mouezh Elvis Presley o kanañ «Jailhouse Rock».
"Faziet out."
"..."

"Just dindan emañ."
"Petra?"
"«Love me tender»."
Sevel a reas en he sav, trumm, o lezel he gwerennad war an daol, ha mont kuit.

Echu ar ganaouenn ez eas en e sav, mont betek ar juke-box ha dont en-dro. Goude teuler e bouez e krogas er bintad he doa lezet ha selaoz ouzh ar sonerezh.

"Bix Beiderbecke," eme outañ e-unan.
"«There ain't no sweet man that's worth the salt of my tears»..."

Parañ a reas e sell war an noz du a-dreñv d'ar prenestr ha mousc'hoarzhin, dic'hoarzh e zaoulagad, outañ e-unan.

39

BOCCACIO
(troidigezh gant Alan Brenn)

KERN EVIT KERN

Klevet em eus e oa e Sienna gwechall daou vourc'hiz pinvidik, anvet Spineloz ha Sepe. Yaouank-flamm e oant o-daou. Edont o chom en hevelep straed. En em garout a raent kalz kenetrezo.

Dimezet e oant o-daou, ha koant e oa an div wreg. Alies ez ae Spineloz da di Sepe, pa veze hemañ er gêr, hag ivez pa ne veze ket. Setu ma tommas e galon ouzh gwreg e vignon. Ober a reas al lez dezhi, kement ha ken bihan ma voe selouet ganti hep dale.

Pell amzer a dremenas evel-se, hep m'en dije an dogan an disterañ diskred. En diwezh, evelato, o welout pegen egarat e oa e vignon hag e wreg an eil e-keñver egile, enkrezet e voe e spered. Da c'houzout ar wirionez, e tivizas un deiz en em guzhat, d'ar poent ma teue Spineloz d'anti.

Degouezhout a reas hemañ evel boas. Goulenn a reas ouzh e wreg pelec'h e oa Sepe. Ar vaouez, o kredin e oa aet kuit he fried, a respontas ne oa ket er gêr. War se e roas ur pok dezhi. Ar vaouez a bokas dezhañ d'he zro. Pok evit pok a rojont evel-se an eil d'egile. Sepe, hag a wele pep tra eus al lec'h ma edo kuzhet, ne lavarar groñs, da c'houzout petra a zeuje da heul. Gwelout a reas e wreg ha Spineloz o vont e-barzh ar gambr-gousket, o prennañ an nor warno. Aes eo soñjal pegen feuket e voe gant trubarderezh e vignon hag e wreg. Kompren a reas ne dalvezje dezhañ da netra ober trouz. E-lec'h gwalc'hiñ an dismegañs, ne raje nemet kreskiñ e vezh. Ne fellas ket dezhañ eta mont e kounnar. Prederiañ a reas hepken a-zivout an doare d'en em zigoll hep trabas. Kavout a reas hep dale ur strobinnell, a rease vennoz kas da benn.

Kerkent ma voe aet kuit Spineloz, ez eas Sepe d'e gambr. Eno e kavas e wreg o kempenn he blev, a oa dispac'het un tammig.

"Petra 'rez aze, va gwreg?" emezañ.

"Ne welit ket?"

"Eo, gwelout a ran. Ha gwelet em eus ivez traoù all, a vije bet koulz din chom hep gwelout."

Neuze e tisplegas d'e wreg kement en doa gwelet, hag houmañ, sklaset gant ar spont, hag o kompren e vije aner nac'h, a anzavas pep tra, en ur c'houlenn pardon, an dour en he daoulagad.

"Ne c'helljes ket," eme he fried, "ober din

brasoc'h dismegañs. Pardonit a ran dit koulskoude, mar fell dit ober pezh a lavarin dit."

"Sentiñ a rin, va fried."

"Lavar da Spineloz dont amañ da nav eus warch'hoazh beure. Degouezhout a rin ur pennadig goude. Kuzhat a ri anezhañ er pikol arc'h-mañ. Morailhañ a ri an arc'h goude se. Neuze e lavarin dit petra a chomp da ober. Gra hervez ma lavarar, ha touiñ a ran dit pardonit hag ankounac'haat da fazi zoken.

Prometiñ a reas ar wreg ober kement a garje he fried, evit gounit he fardon. Seveniñ a reas pep tra hervez ma oa bet gourchemennet dezhi.

Antronoz war-dro nav eur, edo Spineloz ha Sepe a-gevret. An hini kentañ, en doa prometet da wreg e vignon mont d'he c'haout d'an eur-se, a gimidiad diouzh Sepe, war zigarez e oa pedet da verennañ e kêr.

"N'eo ket c'hoazh koulz merenn," eme Sepe. "Arabat dit mont ken buan."

"Mat e vo din bezañ abred. Ezhomm am eus da gaozeal gant an den en deus va fedet."

Hag eñ kuit da di e vestrez. Edont a-boan er gambr, ma klevjont Sepe o pignat gant an diri. Ar vaouez a reas van da gaout aon, a lavarar d'hech amourouz en em guzhat e-barzh an arc'h hag a serras ar morailh warnañ. Neuze ez eas er-maez eus ar gambr.

Sepe a zegouezhas hag a c'houlennas ouzh e wreg ha prest e oa merenn.

"Prest e vo bremaik," emezi.

"Emaon o paouez gwelout Spineloz," emezañ. "Merennañ a ra e kêr gant unan eus e vignoned. E wreg a vo hec'h-unan. It d'he fedin da zont da zebrin ganimp."

An itron, aet sentus gant an aonda vevañ kastizet, a reas raktal ar pezh a felle d'he fried. Lavarout a reas d'hech amezegez n'he doa ket da c'hortoz Spineloz, ha komz a reas dezhi ken brav ma teuas en-dro ganti.

Sepe a zegemeras anezhi hegarat-meurbet. Sin a reas d'e wreg da vont d'ar gegin. Neuze, o kregin e dorn an amezegez, e kasas anezhi d'e gambr, hag e prennas an nor.

"Penaos," emezi. "Evit se eo hoc'h eus va fedet? N'hoc'h eus ket muioc'h a garantez evit va fried?"

40



"Kent kounnariñ, Itron," a respontas Sepe, o tostaat ouzh an arc'h, atav krog en he dorn, "teurvezet ganeoc'h selaou ar pezh am eus da lavarout. Karet em eus ha karout a ran c'hoazh ho pried evel ur breur. Evit ar garantez en deus em c'hevfer, ne ouzon ket ha bras eo. Ne vir ket outañ da gousket gant va gwreg evel ma kousk ganeoc'h. Hen ober a reas dec'h dirak ma daoulagad. Bez' ez eo dres abalamour d'ar garantez am eus evitañ e fell din en em zigoll, kuit a gastiz. Kemeret en deus e blijadur gant va gwreg. Reizh eo e kemerfen va flijadur ganeoc'h. Nebeut a dra eo a c'houlennan. Ma nac'hit, ne vo ket diaes din e bakañ hag e c'hopraat en un doare a gousto ker dezhañ ha deoc'h ivez."

Ne oa ket an itron evit kredin e trubarderezh he fried. Sepe a zisplegas dezhi dre ar munud penaos en doa graet. Kendrec'het e voe neuze.

"Peogwir e fell deoc'h en em zigoll warnon," emezi, "diouzh an dismegañs a zo bet graet deoc'h gant va gwaz, asantiñ a ran. Hogen prometit din ober ar peoc'h gant ho kvreg. Evidon, pardonit a ran dezhi."

"Bezit dinec'h," eme Sepe, "sentiñ a rin, ha gouestlañ a ran deoc'h ouzhpenn reiñ deoc'h unan eus ar c'haerañ bravigoù a c'hellfec'h gwelout."

War se e pok dezhi, e vount anezhi betek an arc'h, hag eno e kemer e blijadur ganti keit ha ma c'hell.

Spineloz en doa klevet pep tra. Droug a savas ennañ ken na vennas tarzhañ. Panevet an aon

en doa rak Sepe, n'eus ket a gunujenn n'en dije ket lavaret d'e wreg. O soñjal, avat, e oa bet eñ en doa dismegañset Sepe ar c'hentañ, ha ne rae hemañ nemet daskoriñ dezhañ kern evit kern, e voe dizaoniet, hag e tivizas chom e vignon muioc'h eget biskoazh.

An amezegez, diskennet diwar an arc'h, a c'houlenn ar bravig a oa bet prometet dezhi. Sepe a zigor dor ar gambr, hag a c'halv e wreg.

Houmañ a lavar d'an amezegez:

"Daskoret hoc'h eus din un dorzh vara evit ur gouign."

"Va gwreg," eme Sepe, o troc'hañ he c'homz dezhi, "digor an arc'h."

Neuze, o treiñ war-du an amezegez, sabatuet o welout he fried:

"Setu amañ, Itron, ar bravig am eus prometet deoc'h."

Diaes e vefe lavarout pehini en devoa ar muiañ a vezh, — Spineloz, a ouie penaos e oa bet doganet, — pe e wreg, o kavout en doa klevet he gwaz kement he doa lavaret ha kement he doa graet.

"Kuit-ouzh-kuit omp," eme Spineloz da Sepe, hep mui ken. "Mar karez, e chomimp unanet evel a-raok. Peogwir n'hon eus netra priziuzoc'h eget hor gwregel, kavout a ra din e tlemp o rannañ etrezomp."

Sepe a asantas. Merennañ a rejont o-fevar evel mignoned.

Diwar neuze, pep gwreg he devoe daou waz ha pep gwaz en devoe div wreg. Morse ne savas tabut etrezo.

41

ALBERT, AR BARZH LABOURER... Tudu

mont a reas daveti, e sellou du paret warni, e zaoarn gantañ en e chakodoù... Dismegansus... Blev du dezhi e giz ur vouarenn... Korf di'si... Trumm e bistagas ur palvad a-feson war he jod. Roudoù e vezied kev war he chroc'hen flour

Ha neuze?... Hi 'a-flav war al leur... Hag-eñ da spiañ he divorzhed kiget-kaer... Of misi!... Liv ar c'houevr... warno... YA... YA...

Albert, ma mignon! emañ o vont betek ar stal kig, g'rit warno an hini vihan mar plij!

ma pelec'h edon erruet?... Liv ar c'houevr warno Petra eo ar sotonioù-se? se 'zo nul!...

Ma... deomp, e-giz-se em bo amzer da brederiañ

Kraozig ma yarig Lost ar big lost ar vran lost an ekeulig bihan... gili gili gili

Da belec'h emañ-hi set ruit?

42

!!

A! BED GARV!

Mat, adstagoomp ganti... ur gwir skrivagner a rank poanañ start...

mont a reas daveti, e sellou paret warni, hag e pokas dezhi. Chom a reas pegouti evel ur vandoz ouzh...

Sell'ita! pebezh c'hwèz flaer

!!



embannadurioù al lanv

Yann Vartolod Ouzh Strak ar Gurun	17,00
E.V. Breeze-Jones & I. Williams	
<i>Laboused an Arvor</i>	53,00
<i>Laboused ar Maeziol</i>	53,00
Erwan & Tudu Kala-Mae	56,00
Gwendal & Tudu Koumanant Echu	45,00

Koulizh Kedez, *Dev an Avel*, "Skrid" Mouladurioù Hor Yezh, 1987
 Bernez Tangi, *Fulennoù an Tantad*, "Skrid" Mouladurioù Hor Yezh, 1987
 Fañch Elies-Abozen, *Barzhaz 1837-1939* (levrenn 1), Mouladurioù Hor Yezh, 1987

Ar varzhoniezh a vo diaes dezhi klemm en hon bro gant a ledan ez eo an dachenn ganti: tri zorkad embannet en ur ober tri miz, daou anezhe nevez-flamm hag an trede o reiñ deomp un tañva eus ar pezhioù a veze savet gant hon zadoù, pe guñv pe gozh e vent.

Ledan he zachenn ha marteze re ledan. Gras e ve deomp ivez gwelout skridoù komz-plaen niverusoc'h o tiwanañ war maezioù hon lennegezh rak un eostad puilh a varzhonegoù — e-skoaz un duilhagid oberennoù e komz-plaen — ned eo nemet azon ul lennegezh yaouank ha bresk, pe hini ul lennegezh war he zremenvan. Trawalc'h deomp teurel ur sell ouzh istor al lennegezhioù er bed a-bezh — pe "vras" pe "vihan" e vent...

Ledan ha lies ivez. Ned eus nemet keñveriañ an daou strobard nevez kenetreze — ur misi deomp — ha, diouzh an tu all, o lakaat skoaz-ouzh-skoaz gant an trede levrenn. D'ar mare-se, e-tro kant vloaz zo, e oa tu d'ar varzhoniezh klemm gant a lies e veze palforset, pa oa krog an dud da vennout sevel ul lennegezh-

krouiñ, gant oberennoù o kreskiñ e kalonoù hag e pennoù hiniennoù — "aozerion" — ha neket o vountañ diouzh spered ur bobl dizanv.

Un drugar eo deomp gwelout eo aet da gozh an amzer-se, o reiñ lec'h da dud evel Koulizh Kedez. Anat eo e vo lennerion o klemm ivez, oc'h embann ez eo dilennus e varzhonegoù: gerioù dianav dezhe pe nebeut arveret o c'hourfaoterekaat, skej na pik da verkañ "framm ar frazenn" (tid an aozer hep mui ken pe reiñ tro d'ar "frazenn" da vezañ lennet e meur a zoare?...), hag all... Heñvel ar vrud a oa gantañ pa grogas da embann eñ e-unan e levrennoù kentañ — en un doare lous a-walc'h, ret anzav, na oa ket evit aesaat al lenn — ha... "n'eus kemm ebet er vro", da levere Jakez. Un hevelep brud a vano gantañ, sur a-walc'h, betek d'al lennerion kompren ez eo al lenn stir ha striv, ha neket lonkañ aes ha prim. Diaesoc'h a-se pa vez kaoz eus barzhoniezh: faziñ a ra tud 'zo o klask enni ur ster splann, oc'h anadiñ trumm, evel ma c'hoarvez gant ar gomz-plaen. Ret kompren da gentañ, evelkent, ned eo ket ar varzhoniezh da vezañ komprenet, meizet, displeget, dielfennet, dezrannet. Bev eo ar varzhoniezh, tu ebet da zispartiañ stumm ha danvez enni. Ur varzhoneg a ranker da c'hallout lenn kant gwezh ha kavout kant doare disheñvel eus an un pezh.

Un eil fazi a vez graet alies gant al lennerion. Lenn a reont end-eeun. Hag ar varzhoniezh, tachenn al lennegezh maz eo intret an donañ an danvez gant ar stumm — hag a-getep —, ma c'hoarier ar muiañ gant al lavar, ar varzhoniezh zo da vezañ lavaret.

Goude lenn,

«...Huonig a c'hwirine
 o c'hwesa roudoù al loar
 ha gant stlabotennoù gwad heol ar bleizi
 (strabouillet
 e leven ruspin-ruspin va muzelloù...» (p.10)

e'm eus lavaret hag adlavaret ar gwerzennoù-mañ, a-vouezh-uhel. Ha heñvel gant "Va eskerneg" (p.46), "Red" (p.47), "Kev ha dev" (p.59),

«...Evel bara e beg ar marnaonieg e varv va c'halon diuz etre ruzelloù ar Pellgen...», hag all.

Ne'm eus ket c'hoant termeniñ spis barzhonegoù Koulizh Kedez, (ouzhpenn ma n'on



ket marteze evit hen ober), o lavarout e tegasont an dra-mañ-n dra, ez int da vezañ liketenet en doare-mañ-n doare, hag all.

Diboell e ve. Meur a santad am eus bet, am bez hag am bo ouzh o lenn, ouzh o lavarout. Kroget o deus ennon e lies doare. Trawalc'h menegiñ ar santad pennañ: hini c'hoarzh an diaoul a-dreñv ar pe, o sellout ouzhimp — peanvioù an holl ac'hanomp — o vrfal, oc'h embarat, o stourm ouzh an amzer o tremen hag ouzh he mevel, an Ankou gant e sac'had kontron. C'hoarzh glas unan a "oar", pa arvest ouzhimp, ouzh hon bu-he-zioù, a renomp, pe a gredomp ren, digompren.

Gant Bernez Tangi e teu pozioù hud ha yud ivez, o plediñ a-wezhioù gant darvoudoù ar pemdez pe gant ar re a vez roet deomp da glevout gant ar skingomz, ar skinwel pe ar c'helaouennoù. Harzhal a ra ha c'hoarzhin tro-ha-tro, c'hoari gant egor ar bajenn, gant framm ar pezhioù; kavout a reoc'h gwerz ha gavotenn, pezhioù o tennañ d'ar c'hanennoù diskontañ pe d'ar c'hanouennoù "bugale", hag all.

Barzhonegoù zo hag a zo brudet-mat dija, kanet maz int bet gantañ hag enrollet gant Storiok. Lies-mat eo e ijin koulskoude, eus "Bet on bet" (p.15) da "Mentoniez" (p.61) en ur dremen dre "Pikadapa" (p.82), "Patrom sillabus" (p.10) pe "Kal'chigula" (p.31)...

Barrek an den ivez da zibunañ istorioù pe da zeskrivañ taolennoù, met aze eo ret din anzav on bet gwall dipitet gant "Marvailh ar pempvet heol" (p.5): savet re aes ha diampart, evel da zegas ar werzenn diwezhañ hep mui ken, daoust pegen brav e c'hell bezañ.

Hud ha yud neuze, da leveren uheloc'hik, ha nerzh, en ur yezh "poblekoc'h" eget hini Koulizh Kedez.

Souezhet-bras — ha spontet-mik, sur a-walc'h — e vije barzhed, pe gentoc'h "gwerzaouerion", an trede torkad o lenn pezhioù an div levrenn all. Un dalvoudegezh istorel a gavan dreist-holl gant an dastumadenn, o tiskouez deomp gant peseurt randonerezh e veze maget hon brizhvarzhoniezh. Ne oa ket deut hon lennegezh-krouiñ d'he ment da neuze ha ne oa ket evit ezteurel muiget santadoù boutin dizrouk. Pelec'h eo bet kredet envel ur seurt lizheradur "lennegezh", m'en dare... Na penaos e krede an aozerion, tud lennek ar peurluviañ anezhe, sevel seurt pezhioù? Pe bal a oa gante? Ha dall ha bouzar e oant ouzh pezh a veze



graet e lec'h all? Pe, ouzh hen gouzout, e fonne dezhe tremen gant skridoù dinoaz, mat da zerc'hel al lennerion war an "hent mat", kuit dezhe da vont d'em goll e koadejer teñval an awen? Meur a abeg zo, anat, hag en o zouez abegoù ned omp mui evit kompren. Ha ret anzav e teue gante, a-wezhioù, pezhioù brav, eeun ha diwidre. Ret em c'houlenn ivez: petra 'vijemp bet hepte, hag-eñ a vije bet ac'hanomp? Hon zadoù-kuñv int bet, ha skrivagnerien mare *Gwalarn* hon zadoù-kozh. Gwall disheñvel an dud, a remziad da remziad.

Nemet ne c'heller ket mirout a soñjal, siwazh, e oa ken pell o barzhoniezh diouzh ar varzhoniezh dre vras evel m'emañ c'hoazh hon c'homz-plaen diouzh hini hon mare. Skrivet-brav eo ar barzhonegoù-mañ a-wezhioù, awenet gwall skañv siwazh, ha borodus ken ez int. Ar re a gav o flijadur gant istor hon "lennegezh" a c'hallo studial kement ha ma kirint, ar re all — o lakaat ne anavont tra e barzhoniezh ar mare-se — a vo dav dezhe lenn al levr-se kent, 'm eus aon, e serrañ da vat hag e ankouazh kenkent.



EUROSKOL

BREST

8-9-10

A VIZ

EBREL

'88

